



100 Years

Niverenn 118
31 Here 1979

IMBOURC'H, KELAOUENN A STUDI

Dekvet bloavezh

Niverenn 118

31 Here 1979

Barzhonegoù, gant Anjela Duval...	p.409
Notennoù politikel.....	p.411
Yezhoniezh.....	p.428
Kenskriverezh.....	p.429
Testenioù diwar-benn Istor an Emsav	p.430
Prosez war vuhez ha burzhudoù Sant- Erwan : un den foll diroll pareet, gant Klerg.....	p.441
A-dreuz lenn, gant J.C.....	p.447
Diwar bennaouiñ, gant an Arvester.	p.451
Burutellerezh, gant H. Lanndiern..	p.453
Kenskriverezh a-berzh Jil Ewan...	p.457
Diskleriadur a-berzh KRISTENION BREIZH e sigur kraf ar sioc'hanerezh.....	p.459

Koumanant-bloaz : 50 lur. KRP:1 534 25N
Roazhon, Y. Ollivier. E miz genver e
krog ar c'houmanant ha reiñ a ra ar
gwir da zegemer ar stagadennoù, da zi-
bab ar re a garfed prenañ. Priz an ni-
verenn-mañ : 8 lur. Ar pennadoù a zo
da gas da : Y. Ollivier, 7 bd. A.-
Burloud, 35 000 Roazhon.

Niverenn-wask : 50 015

BARZHONEGOU gant Anjela DUVAL

UR BUGEL A ZO GANET

Bennozh an Neñv warnout,
Olivier ! Olier ? Olierig ?
Unnerzh nevez 'zo-deut d'az heul
e sev gwanaet ar wezenn gozh...
- Ra vo bolontez an Aotrou
ma vleunio da anv gwelevus ha glan.
Ludu an Tadoù Kozh e don o bez
o deus tridet gant al Levenez
p'eo bet lakaet dit da anv-badez,
o anv familh aet da get
dre wall ar brezel kriz-se
'oa koustet o buhez yaouank
da zaou-c'hant hanter-kant mil
soudard breizhat. Peoc'h d'o Ene !
- Olier ! Gant gras Doue,
ra vi urbugel a sklerijenn,
ur bugel a Beoc'h. Un den
barrek d'ober Enor da Ouenn an Dud !

1añ Here 1979

KI BIHAN ME

Aet 'oas da harzhal
ouzh rodoù foll e garr
ha flastret out bet, paourig !
Da gorfig astennet marv-mik
- ez kichenig ur poulladig gwad -
astennet ken brav ez repoz
da bevar droadig ha da benn.
Frank-digor da lagadoù,
da eneig skañv nijet dija
da Wennva da Ouenn.
Ha me mantret ez kichen.
... Ur mignon 'n deus toullet da vez
e kornig al liorz
ma finoc'hes c'hoazh er mintin-mañ
ur bernig douar- gozed.
... Da vamm 'Brandu',
da vamm-gozh 'Fionn',
hag ar re all, holl nec'het
a c'hwesha al lec'h
m'out kousket da viken.

... E korn va lagad
ur berad dour bervet
a ziruilh war va jod.

3 a viz Du 1979

NOTENNOU POLITIKEL

Peogwir ez eo ar Gostezenn Dehouat Nevez an euzhvil politikel saouzanus a zo bet dizoloet en hañv-mañ (lavaret hon eus en doa DER SPIEGEL zoken en Alamagn gouestlet ur pennad dezhañ) e vimp lezet marteze da rannañ adarre un nebeut gerioù diwar e benn.

Lavaret hor boa ne c'helle ket ar gostezenn dehouat nevez-se - a fell dezhi bezañ 'pagan' - gedal harp ebet a-berzh ar gristenion. A-berzh an 'araogelourion', eveljust ; hogen ivez, na pe-tra, a-berzh ar gristenion 'henounelour', pe kentoc'h, reizhkred (e-keñver feiz) hep muiken. Ergentaou em eus bet tro da lenn ur pennad a-zivout al luskad nevez e dastumadennoù embannet gant ar re-mañ. En unan anezho - e-lec'h e skriv Debray, unan eus renerion ar "Gristenion Dilavar" - e tamaller d'an nevez-dehouidi magañ rakvarnioù a-enep d'ar gristeniezh dre vras. Gouzout a reer ez eo boaz ar veizourion dehouelour da lakaat an Iliz, lakaomp, kiriek da ziskar an impaleriezh roman ha da zizeriadur ar Stad e fin an henamzer en arbenn a'n damant d'ar sklavedu pe a'r preder gant un advuhez h.a. a luske an dud d'en em dennañ diouzh ar politikerezh ha da da wallegañ traoù ar bed-mañ.

An tamalloù-se n'int ket nevez hag ar skriva-gner gallek Rousseau, en triwec'hvet kantved dija, a rae anv anezho (evit o dizarbenn a-hend-all). Klask a rin enta displegañ amañ un nebeut evezhiadennoù en o sigur.

Da gentañ ez eo ret lavarout n'eo ket fall dre ret pep distruj (goude-holl, e labouromp e Breizh evel emsaverion da zistrujañ ur galloud politikel evel m'en deus emdroet e-kerzh ar c'hantvedoù, se ne c'hellomp ket nac'hañ). Hogen, dres, ne c'heller ket lavarout e oa an impalaeriezh roman - evel ma oa-eñ ivez emdroet adal deroù an oadvezh kristen un ensavadur politikel a vije bet da virout. Brein e oa endeo dre an diabarzh ha tonket e oa dezhañ chom gaonac'h evel ensavadur politikel end-eeun, graet ma oa hec'h amzer ganti. Marvet eo an impalaeriezh en un doare natur diwar an dic'henele, he diungenezhded dres : un impalaeriezh n'eo ket ur vammvro diouzh ma lam ar pezh a zo diazez ar garantezvro : un douar a ve nes d'an dud o deus d'he difenn; Rôma gozh ne oa ket diouzh ment mab-den, evel pep impalaeriezh.

Hogen keal an impalaeriezh evel dougerez ha krouerez sevenadur eo a zo gaouiat. Biskoazh ne voe uheloc'h galloud krouiñ Gres en henamzer pe Italia er grennamzer pe Alamagn zoken er c'hantvedoù diwezhañ eget pa oant rannet etre lies keduniezhi politikel.

A-hend-all, diboell eo difenn (evel ma ra an nevez-dehouidi) keal ur romanelezh bennak. Peseurt darempred a zo etre ar republikan Cato ha Nero an Impalaer ? E sevenadur an henamzer e kaver (evel en hor sevenadur-ni, rak n'omp ket gwell, ha gwashoc'h e vemp zoken diouzh maz omp distro d'ar baganiezh end-eeun) ur c'hemmesk iskis a varvariezh hag a sevenadurezh. Meur a Roma a zo bet en henamzer, hep kontañ an hini gristen; ha donedigezh ar pezh a zo bet anvet ar varbariezh ned eo bet nemet un distro d'an dizurzh politikel a zlee reiñ tro da grouiñ un urzh nevez.

Daoust maz eo bet techet kristenion zo, dre

berzh an heulavouriezh ma oant douget dezhi, d'en em dennañ diouzh ar bed, ne c'heller ket lavarout e klote an tech hiniennel-se gant ar speredegezh kristen dre vras. Adal an deroù o deus ar gristenion krouet ur sevenadur hag a eztaole o feiz (kv. an ilizoù a zo bet savet adal ar pevare hag ar pempvet kantved, lakaomp).

Diwir eo ivez an tamall a zo bet graet d'ar gristeniezh ha d'ar feiz bezañ daleet an araokaat skiantel ha kalvezel. Dre zistrujañ ar sklavelezh o deus er c'hontrol herouezet diorreadur an ijinerezh ; meur a gavadenn galvezoniell pouezus a zo bet graet er grennamzer. A-hend-all, er XVvet kantved, en ur grez ma oa trec'h ar 'gealiadurezh' kristen, eo ez eo bet termenet hentennoù ar ouezoniezh hag an anavezoniezh arnevez.

Evit pezh a zo eus ar 'gevatalouriezh unrezekaus' a vije bet degaset d'ar C'hornog dre hent ur sokialouriezh awenet (!) gant ar Feiz kristen, ne gredomp ket e vije bet ar Feiz hag an lliz kiriek dezhi. Ha da gentañ, evel m'hon eus merket, evit un abeg mat : mojennel ha gaouiat eo ar 'gevatalouriezh' sañset arnevez ; kafunañ a ra e gwirionez un urzhaz dir, ha n'eus netra kristen enni, eveljust. Ha gwir eo ivez e laz an urzhaz-se pep intrudu ha pep orinelezh er gevredigezh ; lakaat a ra ar c'hemplegerezh kefredel da ren e pep lec'h. Evit gwiriañ kement-se n'eus hemet sellout ouzh ar re yaouank a vez spontet gant ar soñj e c'hellfent bezañ distag diouzh ar 'yoc'h', diouzh ar 'bobl', - ur 'yoc'h' hag ur 'bobl', koulskoude, a zo krouet hepken gant galloud un nebeut tud. Dres, ne welan ket penaos e c'hellfe ar Feiz kristen bezañ kiriek d'ur c'hemplegerezh nevez ; hi a lavar deomp er c'hontrol en Aviel e tleer sentiñ ouzh Doue kentoc'h eget ouzh an dud! Neuze 'ta, buhez diabarzh

pep hini en e zarempred gant Doue eo a van dalc'hmat ar pep pouezusañ evitañ !

An iskisañ a-hend-all eo e tisoc'h an nevez-dehouadegezh war ur pleustrerezh a zo damheñvel ouzh hini ar gleizidi : hilastalerezh ha sioc'hanerezh (evit gwellaat ar 'ouenn', e-giz evit ar c'honikled hag ar saout, da skouer),holic'halloud ar Stad evel er renadoù sokialour, ha me 'oar-me : n'eo ket hep abeg o deus gellet fogasiñ an Nazied e oa sokialour o strollad.

Kement-se a zo merket mat, a-hend-all, er gelaouennig LE MONDE NOUVEAU a zo kristen hengounel. En ur metou kristen hengounel all, e Bro-C'hall bepred, ur metou roueelour, lakomp, - hag a zo tost da zalc'hidi an oferenn Sant Pius V, (eztaolet eo tezennoù al luskad-se er gelaouenn ITINERAIRES) e vez burutellet ken lemm all an nevez-dehouadegezh. En un doare sebezus a-walc'h e tamaller ouzh al luskad-se en em lec'hiañ a-zêhoù : se ne c'hell nemet magañ an daelerezh diazezet ha reolet gant ar varksourion, emezeur (marteze ivez e touj al luskad-se nad afe dioutañ stourmerion prederiet dreist-holl gant ar stourm enep-komunour). A-hend-all, eme skrivagnerion ar gelaouenn, bez' ez eo an nevez-dehouadegezh darn eus ar reizhiad lieselour kefridiel a denn da virout ar gevredigezh er stad m'emañ war-bouez aotren da bep kostezenn ur 'Garta Sevenadurel' bennak, o reiñ, peurgent, an tu da bep unan da ziavaezañ e vennoz, disammañ e goustiañs, ha reiñ peoc'h goude-se. Hervez ar gelaouenn,emañ ar gristeniezh e dislavar gant keal ur gostezenn dehoù enebet ouzh ur gostezenn gleiz, a zo, adarre,maen-diazez an daou-eneberezhañ marksat. Bez' e vefe ar gostezenn dehouat nevez enta - hervez ar re-mañ atav - awenet ha pellvleniet gant ar 'frañmasoned', eveljust !

Lezel a reomp d'ar c'helaouennoù-mañ o barn-adennoù. Un dra a zo sur koulskoude. Dañjerus eo ar stourmadenn a vremañ a-enep d'urgostezenn dehouat pellañ tasmantel diouzh ma rofe, un deiz bennak, un digarez da brientiñ hemolc'hidigezh ar sorserezed, pa vezo ezhomm da ziskar tud a zirenko ar vistri pe an danvez mistri eus war-c'hoazh. E gwirionez, n'eus e Bro-c'hall nemet strollouigoù dehouelour, kemblac'h d'ar re gleizelour ha ken dic'halloud hag int., daoust ma c'hellont en em douellañ diwar-benn o levezon o-unan a-wechoù. Bez' e c'hell ar strollen emgav bodet en-dro d'ar gelaouenn ITINERAIRES pe kloerdi Ecônes huñvreal e vo gouest da adreizhañ pe da gempenn an liz e-unan, lakaomp ; hogen peuzsur eo n'en deus un delanvad bennak nemet en ur metou mirelour strizh ha gall da gentañ, sorc'hennet gant lstor Bro-C'hall ha galloud ul lu gall faltaziek. Bez' e c'hell ar stourmerion-se spiañ e teuo harzlammerion santel un deiz da adsevel rouantelezh Sant Loeiz. Ar wirionez eo, padal, ned eo al Lu Gall, na petra, nemet ur benveg etre daouarn ar Republik gall a hiziv, evel ma oa etre daouarn ar Republikoù all, da ren an tammig politikerezh etrevroadel a c'hell ren c'hoazh evit ar poent. D'hor soñj ez eo sklareoc'h gwelidigezh ar gristenion a zo bodet en-dro d'ar gelaouenn L'HOMME NOUVEAU, komprenet ganti, da vihanañ, n'eus galloud ebet da gemer en liz, - nemet o seveniñ un disrann e ve, evel ar Brotestanted er XVIvet kantved, - ha n'eus hent digor all ebet d'ar gristenion evit ar poent nemet hini ar c'heduniezhoù dishual a vo diazezet a nebeudoù, hep sikour framm na stad ebet e-pad ur pennad mat a amzer, moarvat.

Lezomp hon euzhvil a-gostez avat ha komzomp

eus traoù all. C'hoant am boa ober un addispleg bennak diwar-benn tri zremenvan c'hoarvezeet hevlene: hini Marcuse, hini Marc oraison hag hini Maurice Clavel.

Krog eur hiziv moarvat da zamankounac'haat piv 'oa Marcuse.Bez' e oa hemañ enta ur prederour amerikan a orin yuzev-alaman a venne lakaat damkaniezh Freud da glotañ gant ar gelennadurezh varksat. Berzh a reas dreist-holl e-touez ar studierion e 1968, evit daou abeg.Da gentañ ez erbede un dieubidigezh revel klok oc'h en em harpañ war ar freudouriezh (meizourion all a gleiz eveltañ o doa klasket a-ziagent difenn hevelep tezennoù, an alaman Reich en o zouez, hogen ne oa ket harpet gant marksourion e amzer ha Marcuse eo a voe dibabet da vestr war an dachenn-se gant ar studierion e 1968).D'an eil, asuriñ a rae o doa ar gefredourion hag ar studierion ar roll kentañ da c'hoari en dispac'h kevredigezhel varksata'oa da gas da benn. Derc'hel a rae Marcuse kont, eveljust, eus saviad ar gevredigezh amerikan, heloc'h ha distabil he c'hendereoù, deuet tre er sevenadur-beveziñ, enni ur renkad micherourion troet da vourc'hizion-vihan ha mirelour a spered. Dindan levezon ar skrivagner-mañ enta, ha dindan delanvad meizourion all evel ar gall Sartre, - ez eus bet fellet da studierion zo e Bro-c'hall hag e broioù all, adal 1968, seveniñ un dispac'h marksat pe led-varksat.Buan a-walc'h avat o deus graet tro-wenn, e Bro-C'hall peurgent, hag hiziv ez eo koazhet da vat gred an danvez dispac'herion a zek vloaz zo, ken na chom mui nemet an drotskiourion war an dachenn er vro-se, koulz lavaret.En Italia hag en Alamagn avat ez eo askoret al luskad dispac'helour war vagadoù sponterion

evel hini 'Kevrenn al Lu Ruz'en Alamagn,lakomp pe ar 'Brigadennoù Ruz' en Italia ha n'o deus evit ar poent levezon bolitikel ebet. Bez' ez eo bet Marcuse, a-benn ar fin, patrom ar falsprofed brizhvarksat brizhfreatat touellet gantañ ur yaouankiz diboellet en ur bed foll ha kaset gantañ ivez war hentoù-dall ar sponterezh. A-barzh pell enta e vo disoñjet e anv koulz hag hini nouspet falsprofed all.

Moarvat e vo ken berrbad all levezon Marc Oraison a zo marvet er mizioù diwezhañ-mañ. Aet e oa an den-mañ da veleg goude bezañ kaset da benn studioù war ar vezekniezh. Marteze en doa bet keuz da vezañ heuliet hent ar velegiezh ha marteze en doa lakaet kiriek d'ar fazi en doa graet, d'e soñj, e gudennoù breidel e-unan, - ha n'oa ket deuet a-benn da zirouestlañ ervat emichañs. Alese, piv ' oar, e oa savet dezhañ ar c'hoant da virout ouzh tud yaouank a ober ken gwazh fazi, hag eñ, diwar neuze,o lakaat e holl breder d'ober ar skarzhañ d'ar c'hloerdioù a oa damleun c'hoazh ugent vloaz bennak a zo. Setu pezh a lavar darn da vihanañ.Evidon-me n'ouzon ket ha reizh eo reiñ kement a c'halloud d'un den bennak :ar galvedigezhioù relijiel n'int.ket bet kaset da hesk gant Marc Oraison hepken ! Touellet eo bet an den-se e-unan, drebenn e vicher da gentañ, gant ar stuzegezh hag ar sevenadur rev-elour a zo en em ledet abaoe pemzek vloaz a zo dreist-holl. N'en deus ket kredet herzel,setu holl. Fellout a rae dezhañ bezañ sellet evel un den sirius gant ar gevredigezh m'edo o vevañ enni,- e-giz an darn-vuiañ eus renerion hag atebion an lliz hiziv ; e gwirionez ned eo bet nemet hekleval lod brasañ eus e genvreudeur end-eeun.

Krog eo al lanv revelour freudat da dreañ bremañ hag en Amerika, da skouer,n'eus ket mui

kalz meizourion o krediñ da vat e damkanadurioù ar mezeg aostrian (nemet ar Vredelfennourion, evel-just met ar re-mañ a c'heller kompren : dav eo dezho gounit o zamm greun, 'keta !) Ar gentel a zo da dennañ eus degouezh Marc Oraison eo ez eo dic'hallus d'ar gristenion chom kristen en ur vevañ hag en ur gemer perzh da vat en ur gevredigezh digristen. N'eo ket plijus moarvat bevañ en harlu pe en ur geto, met gwell eo se c'hoazh eget bezañ distrujet da vat ; d'ar stourmerion, goude-holl gouzout ar pezh a fell dezho. Diskuliet hon eus alies laoskentez frammoù an Iliz e Bro-C'hall. Huñvreal a ra ar re-mañ bepred en ur Stad a roio dezho ul lec'h kefridiel bennak (rak-se o deus difoaret o skolioù, da skouer, o lezel ar Stad d'o reoliñ ha d'o distrujañ dre an diabarzh). Me 'oar n'eo ket aes, evel ma verkemp tuchañtik, bevañ evel estrenion en ur vro (an emsaverion a oar ivez pegen kriz eo se) hogenadarre e lavarimp ne vez a-wechoù diskoulm all ebet d'ur stroll enket a fell dezhañ diogeliñ e zazont ; nemet e kavfe darn didennoc'h en em zistrujañ dre maz int skuizh o stourm end-eeun ; atav e vez aesoc'h yudal gant ar bleizi !

Tro hon eus d'ober anv eus Maurice Clavel er gelaouenn-mañ meur a wech. Goude bezañ kemeret perzh en emsav kleizour ha kleizelour, e 1968, ez eo distroet d'ar feiz ha prezeget en deus diwar neuze evit un Iliz reizhkred ha gredek, enebet ouzh ar bed hag ar politikerezh, relijiel-rik, en ur ger. Un hevelep hent a zo bet heuliet nevez zo gant ur beleg bet douget d'ar gleizelouriezh d'ur mare (lavaromp, kentoc'h, d'ar bolitikelouriezh, e gwirionez) Pauwerts e anv, ma ne fazian ket.

Lennet hon eus darn eus levrioù Maurice Clavel skridaozet en ur galleg pinvidik ha rikamanet, 'prizius', evel m'hon eus merket, nemet nerzhus

ha flemmus meur a dro : anavezout a rae Clavel e yezh ha gouzout a rae ober ganti. El levrioù-se enta e tage ar skrivagner, dreist-holl, an dud a Iliz hag ar gristenion 'araogelour', leun a zevoision... evit ar bed arnevez, o tejanal hag o c'hoapaat anezho en un doare kriz-meurbet gwech a veze.

N'ouzon ket ha kanttroet en deus Clavel kalz a 'araogelourion' gristen. Ne gav ket din. A-benn ar fin emichañs ez eo bet lennet ha prizet e oberennoù dreist-holl e metou ar gristenion reizhkred. Marteze ivez en deus graet tro-wenn ar meizour-mañ dre ma n'eo ket deuet a-benn e-unan da unvaniñ e vuhez-eñ. Un doare hiraezh romantel en doa dalc'het d'e vrizh-huñvreal a 1968 ; fellout a rae dezhañ merzout un elfenn speredel bennak en tun-dispac'h-se. M'en dije bet un tammig ski-ant-prenet, sur, en dije gouezet ne grog an dispac'hoù speredel nepred en engroezioù : ned eo diskennet ar Spered Glan nemet war daouzek abostol en deroù, 'keta ! En em astenn a ra an dispac'hoù speredel a-hed ar c'hantvedoù ha n' o deus ket ezhomm eus safar an dud ; ne vezont holl en deroù nemet ur c'hreunenn sezv. Ned eo bet Mae 1968 nemet ur Saturnalia, gouel sadorn o padout a-hed sizhunvezhoù, hag evit hiniannoù a-hed mizvezhoù ha bloavezhioù, tun-dispac'h ar sklaved ha na fell ket dezho, a-benn ar fin, dilezel ar bed diogel ma oant klenket ennañ. Ha ne gomzan amañ nemet eus ar studierion, tost d'ar bugaleerezh c'hoazh, hag o vourrañ terriñ ha disentiñ, - pezh a zo natur, goude-holl. Evit ar re all, ar re o deus graet ec'hwel, n'o doa nemet ur pal 'keta : uhelaat o rez-bevañ ha tennañ gwell ampled eus ar sevenadur-beveziñ. En hor sevenadur, c'hwi ' oar mat, e saver moc'h evit moc'h rak an dud n'int nemet bevezerion evel ar moc'h o-unan !

Evit bezañ kempoell gantañ e-unan ha gant e gredennoù nevez e tleje Clavel bezañ savet ur stroll bennak da skignañ e vennoziou, ur stroll gouestlet da adreizhadur an Iliz e Bro-C'hall, da skouer. War a hañval, n'eo ket bet damvennet na tentet zoken d'henn ober ; chomet eo e-unan-penn a-grenn, evel nouspet re all. Un tamm trouz he deus graet e oberenn ; feuket, hegaset ha brouezet he deus meur a hini, graet joa da re all, met n' ket aet e wered en tu-hont da se. Skrivañ avat n'eo ket a-walc'h rak antronoz e varv e vez ankounac'haet ar skrivagner.

N'ouzon ket ha klasket en dije Clavel enebiañ ouzh stourmadennoù a seurt gant an hini a zo a-du gant ar sioc'hanerezh e Bro-c'hall hag e riezou kornogat all, hag a zo harpet gant kleizourion ha kleizelourion dreist-holl (daoust m'emañ a-du gant an diforc'hañ bugale strollou an nevez-dehouadegezh, nemet evit abegoù dezho o-unan eveljust.) Moarvat, tu a vefe da lavarout n'hon eus ket da bleidiñ gant ur boblad a zistrujfe he gouenn : n'eus nemet he lezel da vont da get, setu holl. Unan a c'hellfe difenn hevelep savboent evit tec'hout diouzh un daelerezh renet gant ar varksourion, marteze, met ret e vefe neuze anzav n'emañ ket o vevañ er memes bed nag er memes kevredigezh gant paotred ha merc'hed ar sioc'hanerezh - rak an dalc'h a zo dres aze : pa vez ken don ha ken grevus ar c'hemm etre kredennoù ur rumm tud hag ur rumm all, daoust ha lodek int bepred en hevelep kevredigezh ? Se n'eo ket anat tamm ebet !

Evit disteurel ar sioc'hanerezh e ranker reiñ

d'ar vuhez un dalvoudegezh trabedel koulz lava-ha se ne c'heller ober nemet en ur c'henarroud relijiel. E gwirionez ez eo arvarus-tre an arguzerezh implijet gant dalc'hidi ar sioc'hanerezh, evit darn dre maz erbed un helazherezh pilpouz a c'hellfe tizhout warc'hoazh ken klañvourion dibare ken eneberion bolitikel diatoradus ! Nevez zo ez eus bet aozet du-mañ e Roazhon ur voadeg evit brudañ tezennoù an diskenn bugale, ha war ar panelloù peget ouzh ar c'hoc'hu e c'helled lenn un enskrivadur evel-henn, war-bouez nebeut : evit bout evurus e rankont bezañ c'hoantaet ha karet (gwir eo ivez : penaos karout neb na weler ket ? Ma welfe ar vamm he bugel e vefe gouest d'e garout ; rak-se ranker e zifoarañ a-barzh ma vo bet gwelet e zremm !) Ha padal, bez' ez eo ar groueell un danvez tonkadur den, evel maz eo un danvez tonkadur den ar bredklañvour ha na c'hell mui ren buhez kevredel ebet. Daoust ha difoaret e vo ivez ar vredklañvourion pe ar gozhidi gabac'h ha na roont mui joa ebet da zen ? Ha c'hoazh : poellekoc'h e vefe helazhañ ar gozhidi o deus graet o amzer ha n'int mui nemet ur samm evit ar gevredigezh, eget danvez babilged a zeuio da vezañ tud hag a zegaso un dra bennak un deiz d'ar gevredigezh !

E gwir, n'eus tu ebet da zifenn ar sioc'hanerezh. Ma vez renet ar stourm-se gant ar gleizourion ez eo hepken e sell da zistrujañ diwezhañ aspadennoù ur vuhezgezh a argarzhont dre maz eo stag, d'o soñj, ouzh ar gevredigezh henvoazel, ha netra ken. Ha d'ar stourm-se e vez aberzhet dizamant kantmiliadoù a zanvez tud !

Ar pezh a zo a-bouez eo broudañ ar re yaou-ank da fouzhañ an abretañ ar gwellañ, hag int krennarded c'hoazh meur a wech, hag e ser terriñ un hudverzh dilezel pep feiz ha pep buhezgezh

kristen ; hennezh eo ar pal a zo buket ha n'eo ket "reiñ eurvad d'ar vugale a vo bet c'hoantaet" evel ma oa merket war dreuzoù ar c'hoc'hu e-lec'h e oa dalc'het ar 'gouel' (unan ouzhpenn!) en enor ar sioc'hanerezh ; ha merket e oa ivez e-kichen an nor : "Diwall a zo graet d'ar vugale" ... "Bugale evurus hon eus", ar re o deus gelllet dreistvevañ da gontell ar mezeg-kiger, eveljust

...

Poent eo lavarout ur geriennoù bennak diwar-benn kudennoù hor broioù war adsevel. Lennet o devo hor c'houmananterion war ar c'hazetennoù ez eus bet roet un tammig emvelestrerezh e Spagn da Gatalounia ha da Euskadi. Moarvat n'eo ket bastus na spirus an emvelestrerezh a zo bet aotreet d'ar d'ar broioù-se. Anat eo ne c'hell ur yezh bezañ saveteet nemet en ur vro ha n'eo ket en ur rannvro. Reolenn ar gevatalded a zle bezañ lakaet da dalvezout etre ar broioù (ha perak n'he defe ket Euskadi ar pezh he deus ur Stad evel Luksembourg, lakaomp ?) hag en degouezh-mañ adarre, ret-mat eo gwiriañ, n'emañ ket lakaet da dalvezout.

N'omp ket a-du gant gouvrezel ETA; n'eo nemet ur brizh-vrezel ha na c'hell krouiñ stad ebet nemet ur Stad vac'hom ma rafe berzh. Gwell eo enta strivañ da gas bepred war-raok an emdroadur a zo bet distignet gant ar Stad spagnat a-hont. Se a zeuio da vezañ gallus diouzh ma vo anatoc'h-anatañ da renerion ar Stadoù ez eo klozet da vat prantad an impalaeriezhoù arnevez bet diorreet abaoe pemp kantved bennak.

E Breizh, n'eus forzh penaos emaoamp pell diouzh ar gont-se zoken. N'hon eus gwir emsav politikel broadel ebet. Kavout a ra tu an UDB zoken d'en em wallveskañ gant paotred ar sioc'hanerezh

(a-gleiz ez eur pe n'eur ket, 'keta), A-hend-all n'hon eus nemet stourmerion dall ar FLB, un daou -c'hant bennak abaoe dek vloaz, - kurusted ha n'int gouest nemet da lakaat ar bolised da fogasiñ ha da dapout galoñsoù ; ha, neuze, stourmerion ar stolloù 'anveliour; rak stolloù aseurt -se ez eus ha nevez zo e kleven komz eus unan a zo e dalbenn ARGAD BREIZH, damheñvel e zoare moarvat ouzh hini ar stroll a oa anvet STOURM BREIZH un nebeut bloavezhioù zo. Me 'gred en doa ar stroll-se kemeret perzh en hañv-mañ en ur gouel a oa aozet e Gwengamp gant LE CANARD DE NANTES A BREST (netra nemet an talbenn a ziskouezfe a-walc'h pegen intret eo ar 'stourmerion vrezhon' gant ar stuzegezh politikel c'hall), - ur stroll hanter kleizelour, hanter anveliour amvevadour, diboell, o tifenn ar sioc'hanerezh evel amvevadourion all zo ! Ma ! Hervez am eus klevet ne felle ket d'ar vrogarourion iskis-se (ret eo krediñ ez int brogarourion, + koulskoude) - ober meneg eus Istor Breizh, war zigarez e c'hellje an dra-se bezañ anoazet stourmerion all a oa ganto er gouel ha n'oa ket Breizhiz anezho ! Padal, petra a chom eus Breizh adal ma taoler d'ar blodoù an istor anezhi ?

Dres, tro hon eus bet nevez zo da deurel ur sell war ar gelaouenn COMBAT BRETON a zo tost a-walc'h da ARGAD BREIZH ; enni e skriv un nebeut stourmerion vrezhon, reoù anezho anavezet mat evel Glenmor e-unan. Eztaoliñ a ra mat an dastumadenn-mañ emdroadur lod eus ar stourmerion war-du ur stumm bennak a anveliouriezh. A-benn ar fin ez eo difennet ar FLB gant ar re-mañ dre m'o deus kemeret perzh, d'o soñj, en un oberiadenn anveliour. E pajennoù COMBAT BRETON evel e-barzh EMSAV ergentaou e tisklerier ez eo dilezet gant harperion ar gelaouenn an diarc'ha-

dur da sevel ur Stad (an diarc'hadur a-du gant ar vroad). Hogen daoust ha prederiet o deus paotred ARGAD BREIZH kement-se diwar-benn ar stourm a renont? Moarvat, kompren a ran ur youl dispac'helour zo, ur youl da neveziñ a-grenn ar gevredigezh hogen c'hoazh e vefe ret dezho bezañ soñjet ervat diwar-benn ur pal resis d'o obererezh ha se n'o deus ket graet, sur-mat. Santout a reer moarvat e pennadoù ar gelaouenn COMBAT BRETON ar c'hoant da enebiñ ouzh urzh dir an UDB nemet en un doare nac'hus a-grenn. Ne fell ket deomp burutellañ amañ tezennoù an anveliouriezh vrogar nevez-mañ ; lavarout a raimp hepken n'eo ket fur krediñ e c'heller dioueriñ ar Stad, - da lavarout eo, ur galloud reoliekaat ha kreizennañ war ur bazenn bennak eus ar gevredigezh. Ar pezh a zo reizh ez eo lemel digant ar Stad he roll a aotrouniezh speredel he deus skrapet digant an Iliz, hag adsevel an Iliz hec'h-unan.

Deuet eo ivez betek ennomp'Kannadig diabarzh' liestennet, ennañ pennadoù a zo bet adembannet a-wechoù e-barzh un niverenn nevez eus an AVE-NIR, moulet e glas, a zo o paouez dont er-maez. Derc'houezañ a ra ar gelaouenn-mañ savlec'h ar MOB er par m'edo errukent na vije kroget da zize-riañ. En niverenn a zo o paouez dont er-maez e kaver ur burutelladur eus linenn bolitikel an UDB a zo reizh a-walc'h ; ar pep gwanañ en UDB a zo he linenn bolitikel a-gleiz, se hon eus lavaret alies, ne vern pegen talvoudus e c'hellfe bezañ hec'h obererezh war dachennoù all a-hend-all. Bezet pe vezet, ne gaver ket er C'hannadig nag en AVENIR an uhelvennadurezh un tammig mokedek a zo strewet e pajennoù ar COMBAT BRETON ; tost eo chomet SAV d'ar vroadelouriezh hengounel, - ha gwelloc'h eo, d'hor soñj. Notomp koulskoude ne

vefemp-ni ket tentet da estlammiñ ouzh ar renad yougoslavat war zigarez ez embann bezañ a-du gant an emvererezh e pep pazenn eus ar vuhez kevredigezhel. Er broioù-se ez eo manet ar Strollad Komunour mestr ar vuhez politikel ha speredel (er c'heñver-se e ra mat ARGAD BREIZH o tagañ ar galloud-se er gelaouenn COMBAT BRETON) ; ha n'eo ket dre maz eo ur Stad komunour dishual diouzh Moskov e ve dav damantiñ dezhañ muioc'h ; er c'hontrol, darn evel ar Strollad Komunour Albanianat a oa ken enebet ouzh ar feiz ha ne vern pe strollad komunour dre ar bed. N'omp-ni ket avat enebet ouzh ar Stad komunour dre maz eo Stad rak n'omp ket enebet ouzh ar Stad dre ben-naenn nemet ne c'hellomp ket harpañ ur Stad a labour da zistrujañ an talvoudoù a gredomp enno, setu ! N'eo ket abalamour maz eus kerent ha tiegezhioù fall e tlefed distrujañ an tiegezh pe, a-benn ar fin, e vefe ret distrujañ ar vuhez hec'h-unan e skeud ma n'eo ket mat atav. Huñvreal en gevredigezh distad a zo huñvreal er Baradoz, ha n'eo ket eus ar bed-mañ, evel ma oar pep hini.

Tro hor bo emichañs da ziefennañ a-dostoc'h ar mennozioù a vez displeget er stolloù hag er c'helaouennoù hon eus nevez veneget. Evit echuiñ avat e komzimp adarre eus prosez ar FLB a zo o paouez echuiñ. Moarvat en deus roet tro ar ar prosez-mañ d'ar stourmerion vrezhon e-pad pemzektez bennak da ezaoliñ o mennozioù daoust ma n'eo ket unvan na gwall sklaer ar mennozioù-se atav, lod o vezañ broadelourion, reoù all un doare anveliourion (ur c'hemmesk ez eur boaz outañ abaoe an eil FLB dreist-holl, an hini kentañ o vezañ bet unan brogar dreist-holl, a gav deomp)

Evel maz eo kaer gortoz, harpet eo bet ar stourmerion FLB dreist-holl gant al luskad 'broad-elour' hengounel, hag ivez, gant ar stourmerion anvelielour, e chal gant an amvevad h.a. A bep seurt testoù a zo bet galvet war-dro an damallidi, Breizhiz, izili eus ar P.S. gall, ha Michel Rocard e-unan. Evel boaz ivez he doa an UDB gourc'hemennet d'hec'h izili chom hep dougen testeni dirak al lez-varn. Ahafted pe furnez ? Moarvat diwar an eil hag eben o deus renerion ar strollad kement an disentez-se. O vezañ maz eus anezhi ar strollad politikel breizhat nemetañ war an dachenn e Breizh ne fell dezhi e nep doare reiñ da soñjal e vefe gouvleniet ganti oberiadourion ar FLB. Reizh eo a-wechoù burutelladur ar FLB gant an UDB, evel pa bismig, da skouer, difeulster ar gronnad-se ha na venn ket skuilhañ ar gwad evit ren e obererezh ; Breizh ne verit ket an dra-se a c'houlenn ar PEUPLE BRETON? Gwir eo ivez n'eo ket diazezet 'peoc'helouriezh' ar FLB war ur brederouriezh pe un dezrannadur politikel bennak ; awenet eo kentoc'h gant un doare abafted, hanetra ken ; koulz e vefe d'ar stourmerion dilezel zoken ar feulster arouezennel ma reont gantañ, ha na c'hell nemet o degas d'ar feulster rik ha d'ar sponterezh gwirion, a-benn ar fin.

Adarre ez eus bet anv e-pad ar prosez eus doareoù-ober ar gerreizh politikel, eus bourevierezh, ha me 'oar-me, un diskan anavezet. Adarre ez eus bet klevet kel eus drammoù pounchaset d'ar garc'haridi war-lerc'h tri pe bevar devezh goulennata, evit reiñ nerzh en-dro dezho, ... hag o lakaat anezho da gomz... gant ur red-teod diharzus, a-hervez. Digomprenus eo ivez ar barnedigezhioù. Evit tamallidi zo n'eus keñver ebet etre an danvez-kehuzañ bet gwiriekaet hag ar prantadoù-karc'har m'int bet barnet dezho. Krediñ a rafe

unan a-walc'h ez eus bet klasket gwalc'hañ un droukrañs bennak a-enep da dud zo. Evit prizoni-di all bet didamallet a-benn ar fin, ne gomprenet ket kennebeut perak int bet dalc'het keit all en pa oa ken tanavan danvez-kehuzañ. Moarvat emeur distro en amzer al lizhiri-siellet pe, kentoc'h, n'eur ket deuet er-maez anezhi biskoazh emichañs a-walc'h. Se a zo politikerezh, brizh-politikerezh, evel hini ar FLB e-unan, ur politikerezh dall ha diboell : p'emañ ar Stad Spagnat hec'h-unan o reiñ un tamm bennak a emvelestrerezh da Euskadi ha da Gatalounia e kendalc'h ar Stad C'hall gant ur c'hreizennerzh kivers ha n'en deus mui ster na talvoudegezh ebet !

Y.O.

NOTENN

N'omp ket a-du gant ul lezennadur-destrishañ a-enep d'ar merc'hed peurgent ; ur sevenadur hag ur gevredigezh penn-da-benn a zo e kont en degouezh-mañ. Hogen ne gav ket deomp ez eo fur aotren direolderioù er reizh a zleer heuliañ evit ar sioc'hanerezh, - e-giz ma ra Delumeau e-barzh QUEST-FRANCE, lakaomp. Ma asanter da ziforc'hañ ur bugel war zigarez ez eo frouezh ur gwalladur e kastizer ar bugel e-unan war un digarez a zo gouennelour a-benn ar fin. Ha n'eus abeg ebet da zistrujañ ar vugale nammet a-raok pe goude ar c'hanedigezh, nemet evit disammañ ar gerent adarre. Iskis eo penaos en degouezh-mañ adarre e talc'her kont eus hoalvat tud zo en ur aberzhañ unan all e-giz pa ne vije ket anezhañ e gwirionez.

YEZHONIEZH

Roparz HEMON : Geriadur Istorel ar Brezhoneg
Rann 35 (Traezheg-Turkeg). Rann 36 (Turkeg-
Zouav). Embannet gant PREDER.
Burutelladur gant KLERG.

TREC'HAN/TREC'HIN=dichalañ. "Ne drec'h ket ar mor
hiziv." Kv. TRE, TREC'H.
TRESMEIN. Da dostaat ouzhar ger "dismeiet": dislivet,
drouklivet, a glever e Treger-Vihan (Kemper-Gwezenneg)
TREUZIN. Tremen, distremen e korn-bro Lanuon-Landreger
"treuziñ un den"=tremen anezhañ. "Treuziñ ur wetur"=
tremen anezhi.

TRIST. Graet e vez ivez gant ar ger en ur stumm ispi-
sial : "Trist eo ! " o komz eus ul loen klañv.

TROAD-POTIN. "Troad-pok", e korn-bro Lanuon.

TROC'H. "Eus an troc'h kentañ"="eus ar renk kentañ".

TROELL. Ger gourel e Treger : "an troell".

TRON. Trouz an aer domm goude kreisteiz. Lenn "Tron".

TUAN. E Treger e klever : "tueet da..."

TURGN. Klevet e vez ivez : "an durgn", "un durgn". Da
dostaat moarvat ouzh ar ger "teurng"=kempenn. "Ur
plac'h teurng"=pep tra en urzh ganti hag en-dro dezhi

TURK. Ne glever en Treger nemet : "Turked, an Turked"

VOLTENN. N'eo ket "brud o redek" met "trouz", "ober
trouz". "Graet en devoa ur voltenn eno!" "Ober pol-
tennoù ! "

VIN. "Vin-dall"=hent-dall.

YEKOU. "Tieko(ù)" eo a leverer. "Homañ 'ra tieko(ù)"=
ardoù.

oooooooooooooooooooo

KENSKRIVEREZH

Deuet eo betek ennomp al lizher-mañ a-berzh ur pri-
zoniad eus ar FLB. Kaset e oa da SKOAZELL VREIZH.

Kenvroad ker,

da gentañ e fell din hotrugarekaat evit al labour dreist ka-
set da benn gant SKOAZELL VREIZH. Pouezusat tra, p'emaomp kraouiet
da vat ha skuilhet warnomp viltañsoù a bep liv gant kement kaze-
tenn a zo, war vete-nebeut.

Gouzout a reomp ne vimp ket barnet diouzh hor mennoziou, hor
broadelouriezh (stag ouzh kement stourm ar broioù mac'het a zo) na
kennebeut diouzh ar pezh a zo bet graet ganeomp-ni.

Met n'omp ket digalonekaet, pell emañ ! Er c'hontrol-bev ne
c'hell kement-se nemet kreñvaat hor pennmennoziou a-enep da va-
c'homerezh ar Riez C'hall. Ha ma ne vez ket gwashoc'h egeti evit
korvigellañ dre zindan ned aimp ket da c'houlenn diganti aluzen
hon dieubidigezh. Mat ma teu, mat ma ne zeu ket !

E skoaz a ouzon (met piv a oar?), ne vimp-ni ket barnet a-
raok miz Ebrel a zeu (amzer a-walc'h evit hiraezhiñ d'ar peamzerma
vo kaset Bro-C'hall d'ar blodoù !) Kement-se, evit ober goap !

O c'hortoz emañ e sell ar c'hentañ prosez. Diouzh a glevomp
bremañ-mare n'eo ket ken fall-se seblant anezhañ. Gant ma ne vo
ket lakaet war-wel d'an holl seurt enebiezh, blaz ar rambreachoù
ganti ! Dav dezho kavout un diazez boutin da zifenn.

Trugarez deoc'h a wir galon

TESTENIOU DIWAR-BENN ISTOR AN EMSAV

Hor pal ez eo hepken dastum testenioù a c'hello bezañ talvoudus d'ar re a skrivo un deiz, en un doare onest ha diuntuek, istor ur marevezh diaes, pa vo bet merglet gant an amzer mojennoù trec'hourion un eurvezh.

H.L.

DANEVELL PAOL GAIGNET

Dec'h eo deuet Paol d'am c'havout, hag eñ ambrouget gant Augustin Cattelliot. Ne ouien ket kalz tra diwar-benn e vuhez daoust m'en deus c'hoariet ur roll e-barzh va hini ha maz eo chomet ar c'houn anezhañ bev bepred em eñvor. Evidon-me ez eo ar stourmer brezhon kentañ maz eo manet ar soñj eus e zremm garanet em spered, pa oan deuet da reiñ va anv e sez ar Strollad Broadel, straed ar frankvourc'hizion, e Roazhon; d'ar c'houlz-se e wisken c'hoazh otoù berr ha 39 blaz a zo tremenet abaoe.

N'hon eus ket bet tro, koulz lavaret, d'en em adwelout a-c'houde ar mare-se. Skubet omp bet evel delioù gant ar gorventenn, pep hini o chom en un tu eus ar voull-douar enebet ouzh egile, hogen aes eo bet din e anavezout : bihan-tre, koujorn, fetis e gilpenn, melen-rouz e vlev a zo deuet bremañ da vezañ brizh ; daoulagad glas, mesket enno un tamm liv gell ha bepred ar memes dassked a fent enno ; kromm e fri evel beg un erer, kreñv liv e zremm. Bevañ a ra e Pariz, en harlu hogen emañ o paouez mont war e leve ha klask a ra distreiñ da Vreizh evit echuiñ e vuhez. N'en deus gallet dimeziñ nemet diwezhat a-walc'h met chañs a-walc'h en deus bet evit kaout tri mab a zo dezho 23, 26 ha 29 bloaz hiziv an deiz.

Ganet eo Pal e 1913 e Bourdel. E dad a oa kabiten a vor er verdeadurezh-kenwerzh, Roazhonad a c'hane-digezh, o tennañ e orin eus Sant-Malon, war lez koa-deg Brekilien, nepell diouzh harzoù departamantoù ar Morbihan hag an Il-ha-Gwinun. Un tiegezh kouerion er

penn-kentañ hag er c'horn-bro-se e kaver c'hoazh tiegezhioù a zoug an hevelep anv, a gav din.

Eus rannvro an Naoned e oa tiegezh e vamm hag hi ganet e 'Kêrregrip' ('La Regrippière'), ur vourc'h en em gav war an harzoù etre Breizh ha Bro-C'hall, ken e oa lec'hiet ti e dud-kaer dres a-c'haol war ar wazh-dour a zispartie gwechall ar Stad Vrezhon diouzh rouantelezh Vro-C'hall.

Lavaret hon eus e oa e dad kabiten-a-vor. Roet e oa bet dezhañ da zibab etre Saigon ha Bourdel evel porzh-eoriañ ha pa oa nevez dimezet en doa dibabet ar c'hinnig kentañ. Mervel a reas war vor pa ne oa e vab nemet c'hwec'h vloaz hogen adal an oad a bevar bloaz hanter e oa distroet Paol da Vreizh gant e vamm deuet da vezañ intañvez ha kemeret ganti ur c'henwerzh bleunioù evit bevañ, e Roazhon, e traoñ leurgêr ar maerdi, e-skoaz d'ar c'herreizhdi.

E Sant-Marzhin en doa graet e studioù betek ar c'hlas kentañ ; neuze e teuas tre el Lise (unan a oa hepken d'ar c'houlz-se, hini Bali Genver) e 1931.

Ur wech ma oa o tont er-maez eus ur gentel e kejas war ar riblenn-straed gant un den yaouank melegan a oa o tarnaouiñ traktoù. Unan anezho a gemeras. Tri devezh war-lerc'h e krape gant diri straed Edith Cavell, e-lec'h edo rannidi Debauvais a servije war un dro da sez diastal d'ar Strollad Broadel. Eno ez adwelas an hevelep den yaouank, melen e vlev, a ziskouezas bezañ Remont Delaporte, hag ur paotr all yaouankoc'h, Frañsez Kervella, a grogas da c'houlenn outañ: "Petra hoc'h eus da lavarout a-enep ?"

Frañsez Kervella ne oa ket ur serjant-tutaer ; an tamall-se ne c'heller ket ober dezhañ atav ! Ur seurt degemer a oa sklasmus a-walc'h evit un danvez-ezel. Gwell a se en em gave Remont Delaporte eno hag hemañ a renkas an traoù en un doare jentil-kenañ.

Neuze eo e reas anaoudegezh gant Debauvais.

Evit bezañ deuet da vezañ ezel ar Strollad Broadel

e ranke, marteze, kaout en e diegezh un hengoun bennak pe ur soñj bennak diwar e vugaleerezh ? Ne gredan ket nemeur e vez ganet diouzh netra ar galvedigezhioù. Ar goulenn-se am eus graet d'am gweladennet ha da gentañ e respontas "nann" ; n'oa hengoun breizhat ebet en e diegezh. "Emzivad on bet a-vihanik," emezañ. "Marv eo va zad pa ne oan nemet c'hwec'h vloaz ; o verdeiñ e veze alies ; n'em eus ket e anavezet, koulz lavaret. Diwar-benn Breizh n'en doa lezet war e lerc'h nemet ul levr, un oberenn : "Breizh a wechall hag a vremañ" gant Pitre-Chevalier."

- Ha daoust hag e lennet hoc'h eus ?

- Eveljust em eus e lennet hogen e gwirionez ne oa ket bet skoet va spered neuze gant ar pezh a oa breizhat-rik el levr-se. Ar pezh a blije din eo da gentañ an istorioù chouanted. Ha se a oa c'hoarvezet dre ma kleven va moerebed, ar re a oa o vevañ c'hoazh e Kêrgrap a oa en em gavet e-kreiz brezelioù ar chouanterezh hag ar Vande. Kontañ a raent sorbiennoù o doa klevet o-unan digant o zud-kozh :

ar paotrig bihan-se a oa degouezhet d'ar red, krog en e votoù-koad, berr e anal hag o c'harmañ : "Emañ ar re C'hlas o tont ! Tec'hit kuit !"

Pa oa tremenet ar barrad spont ha pa oa deuet endro an holl, ne chome mui netra war an daol. "A, al lorgnez ! Debret o deus ar soubenn-laezh !"

Se avat ne oa ket gwall c'hrevus.

Ur wech all e oa an holl o tivandennañ. Mont a-ont d'en em guzhat e-kreiz ar gwiniegi ; se a raent an aliesañ ; ur vaouez a zouge ar babig e-barzh he zavañjer ; ken pennfollet e oa ma laoskas ar babig da gouezhañ hep gouzout dezhi. Erruet e-kreiz ar gwini e verzas e oa bet kollet ar babig ganti. Petra ober d'ar c'houlz-se ?

Ma vez kavet ar babig gant ar Re C'hlas e c'hoar-int teurel anezhañ er vann evit e lakaat da gouezhañ war veg ur vaionetezenn, e ser kaout un tammig fent ... Ma tistro ar plac'h avatha ma tapont anezhi... A-

benn ar fin e teu en-dro war he c'hiz hag adkavout a ra ar babig hep bezañ bet gwelet hec'h-unan hag hi d'en em skoachañ adarre e-kreiz ar gwini e-lec'h e chom e-doug an deiz. Ha neuze 'ta, e oa ivez an tise se a oa d'e dud-kozh, bet savet evel ur pont a-us d'ar wazh-dour a servije da harz etre Breizh ha Bro-C'hall ; dres a-c'haol war ar wazh-dour avat edo gwele an tad-kuñv hag ar vamm-guñv, hag a-wechoù e lavare an hini kozh d'e wreg :

- Emaomp kichen-ha-kichen ha padal me a gousk e Breizh ha te a gousk e Bro-c'hall ! "

Kement-se, eme Baol, en doa skoet va spered emichañs !

Eveljust n'o doa ket tud e diegezh mennoziou breizhek, da gomz gwir, hogen Brezhoned e oant en ur doare natur-kenañ. Pa rae e voerebed eus Roazhon meneg eus ar Warded Heloc'h vreizhat o doa gwelet oc'h pleustradegoù war Dachenn Veurzh e komzent atav, da skouer, eus ar 'soudarded vreizhat',- ha ne vije ket deuet war o spered reiñ dezho un anv all.

- Penaos eo c'hoarvezet ganeoc'h en em gavout en Alamagn e 1944 ?

- C'hwi 'oar, ne oan ket douget-meurbet d'an Alamanned na dreist-holl d'o renad genaouek ha gwadek hogen d'ar mare-hont, evel kalz stourmerion vrezhon, edon war var da vezañ diskaret hep bezañ bet barnet. Kement a oa breizhat a ranke mont da get. E-giz-se eo ez on en em gavet e-kreiz engroez ar repuidi a skoe war-du Alamagn evit saveteiñ o c'hroc'hen, da c'hortoz."

Evurusamant e oa un tammig arc'hant gantañ, rak deuet e oa a-benn da gemm e lurioù gall evit markoù alaman e Straevourc'h. Eno en doa kejet dre zegouezh gant ur stourmer breizhat all, Job ar Ruyet, e wreg

hag o bugel a zougent en un doare korbell. Se a oa, emezañ, evel ar Werc'hez Vari, Sant Jozeb, hag ar Mabig Jezuz. Evelto e oant paour ; evelto ivez o kantren. Mindrailhet e oa bet ar Ruyet un tu bennak war an hent, o skeiñ war-du Alamagn. Tizhet e oa bet penna-da-benn en ur c'hostez eus e gorf ha kerzhout a rae oc'h en em harpañ war ur vazh. Kirri-nij ar Re Unanet d'ar mare-se, e gwirionez, a vindrailhe kement a fiñve war an hentoù, hep ober diforc'h ebet, ha Paol e-unan en doa prenet skiant a se. Edo o paouez gwelout mi-gnoned a oa o vont war-du porzh-houarn ur gêrig vihan en devoa nevez kuitaet un nebeut munutennoù kent; dirazañ, war-hed un nebeut metradoù, e valee ur gouerriadez alaman gozh. Klevout a ra ar c'hirri-nij o tont en-dro ; o gwelout a ra o tennañ hag amzer en deus hepken d'en em deurel er foz. An hini gozh a gendalc'h da gerzhout hep ober van. Emichañs e oa bouzar-gloc'h. Soñjal a ra : "Emichañs emañ o vont da vezañ lazhet!" Lammat a ra, kregiñ e diskoaz an hini gozh hag he zeurel gantañ er foz, dres e koulz evit mirout outi a vezañ lazhet gant un dennadeg.

Lavarout a reer d'ar poent-se d'ar re Ruyet ha dezhañ emañ ar C'hallaoued o tegouezhout en o gennva. Eveljust, nag an eil nag egile n'oant e chal d'o gor-toz. Da belec'h mont avat ? N'o doa ket fiziañs er Suisiz. Ar re-mañ a vez prest da zegemer a galon vat ar c'hevalaoù met ar repuidi, se a zo un afer all. Nann, ar gwellañ e vefe c'hoazh mont betek Italia e-lec'h e ren ar rouestl hag ar mesk an estlammusañ. Dav eo mont betek Konstañs, ur gêr na c'heller ket kavout he gwell rak hanter suisat, hanter alaman eo ha tu a zo da repuiñ enni ha ha da dec'hout evel-se diouzh ar bombezadegoù. Ul lec'h-tremen eo ivez. Ha gant ur bagad repuidi all e klaskont treuziñ an Alpoù.

E-kreiz an erc'h e kerzhont bepred, bec'h warno, gorrek o c'hammedoù, ha war ar marc'had, unan eus o c'henseurtes, un den yaouank, a zo gantañ droug ar menezioù. Ingal e chom semplet ; ret e zougen hogen divi ez int ha ne chom dezho a-benn ar fin nemet di-

bab etre daou ziskoulm : pe e zilezel, pe diskenn en-dro, war-du argompezenn ha chom hep tremen dre linenn ar c'hernioù nemet war var da vezañ paket da bep eur

...
Mont a reont war-draoñ en-dro enta hag eveljust ez int dastumet gant an Amerikaned a zaskor anezho dinec'h-kaer d'an darsavidi italian. "Fascisti!" daoust ha fuzuilhet e vint ? Ne vint ket. Emaomp war an Adig-Uhel hag a-hervez ez int memestra prizonidi amerikan. Aon o deus an Italianed avat na vije roet da Aostria an douaroù 'dizaspen'-se ha gwell eo ganto bezañ fur. Damc'houde a-hend-all e vezint dieubet gant ur bagad lukerreizhidi c'hall ! Un nebeut ofisourion, renet gant ur c'habiten en unwisk amerikan nemet gant arouezioù gall a zeu d'en em ziskouez ha da c'houlenn :

- Perak emao'h aze ?
- A-enep d'ar gomunourion omp !
- A-enep d'ar gomunourion ? N'oc'h ket hoc'h-unan

.....
O c'has a reont ganto hag... e laoskont anezho da vont !

An dud-se, repuidi evelto, hag hardizh-meurbet, a oa aet da gavout an Amerikaned e-giz pa vijent bet ofisourion c'hall, bet prizonidi, ha diganto o doa tizhet kaout unwiskoù, djipoù ha me 'oar-me! Kenderc'hel a reont da ergerzhout ar vro ha lakaat a reont dieubiñ ar muiañ a dud ar gwellañ.

Paol, ar Ruyet hag e diegezh a vevo. neuze e-pad ur pennad amzer en ur greizenn eus ar Groaz Ruz etrevroadel en Alpoù Tirolat bepred. Setu avat ar C'hallaoued o tont, ar re wir en dro-mañ. Ar wech-mañ n'eus ket tu dezho da dec'hout. Breutaat a reont diwar-benn peseurt emzalc'h kemer. Ar re Ruyet a lavararo ez int bet deoget gant ar Servij Labour Rediek. Setu int en hent, ar Ruyet a zo bet gloazet gant ur vindrailhadeg war an hent, hag eñ, Paol, a zo deuet

da vezañ 'facchino', ar simiad : o sikour a ra da zougen ar babig. Skeiñ a reont war-du Bologna e-lec'h ez eo bet erbedet da Ruyet ur mezeg arbennigour war an eskern a raio war-dro e c'houlloù.

Setu ar pezh a gontint ; hag an istor-se a zo kredet ! Degouezhet int gant ur c'habiten gall kozh hag a lez anezho da vont kuit war-du Bologna, nemet o lakaat Paol evelato war ziwall en un doare hegarat :

- Ma ne rit ket ho mad eus an drovezh-mañ, ne gavot ket marteze unan all evit distreiñ da Vro-C'hall a-barzh pell."

Setu int aet da Vologna, hag alese da Roma, 'Via Appia Nuova' Eno e teuont da c'houzout ez eus e penn an Diogelroez Vilourel C'hall un tad dominikan, ha Ruyet a zo dispontet. "Ur beleg eo!" Diskleriañ a raint pep tra dezhañ ha kompren a raio. Termal a ra Paol avat. "Martez eus ur beleg anezhañ, a soñj-eñ, met ur Gall a zo anezhañ da gentañ, ha d'an eil, ofisour an Diogelroez, ha neuze, beleg evit echuiñ." Dav eo derc'hel warnañ evit maz afe d'eg gavout.

Etretant o deus goulennet ha tizhet kaout un emgav gant ar C'hardinal Tisserand. Degemeret int e-barzh sal-degemer divent e di-annez, Via della Consolazione.

- Daoust ha sevenet hoc'h eus torfedoù gwadek ?
- Eveljust, n'hon eus ket, Ho Priegezh ! A-enep d'ar gomunourion omp hepken.
- Neuze n'hoc'h eus netra da zoujañ. Ur seurt torfed n'eo ket dibardon. Maodiern ar Barnerezh Gall a zo un Demokrad Kristen. An aotrou Teitgen ez eo ! "

(O lavarout se, eme Baol, e oa ar c'hardinal rusoc'h eget e soutanenn!)

Ar wech-mañ ne c'hell mui ar Ruyet padout. Dont a ra ar vuhez da vezañ diaesoc'h-diaesañ e Roma. Paol a dap an aotre da vont da gentañ da c'houlenn un emwel gant an ez-tad-dominikan-ofisour-an-diogelroez - peogwir ez eo dizemez - ha ma n'eo ket deuet en-dro a-benn div eur e ouezo ar Ruyet petra a zo c'hoarvezet gantañ.

Emwel gant an Tad-Dominikan-Ofisour-an-Diogelroez ... Un den emellet-meurbet hag a zegemer anezhañ etre daou grogad. Emeur e dibenn ar mintinvezh.

- Sellout a rin pizh ouzh hoc'h afer. O c'hortoz, it 'ta da zebriñ merenn er c'hazarn ! "

Setu Paol o vont kuit en un djip d'ar c'hazarn, diambroug, dieub a-grenn. Bez' ez eo ar c'hazarn ur palez deoget. Eno avat, tamm merenn ebet. Hêrzel a reer anezhañ kercent hag e vac'hañ en un doare kav e-lec'h en em gav dija un dousennad a dennataerion varokan serret evit pec'hedouigoù dister : bezañ gwallet un italianez ha me 'oar-me...

Eno e tremeno un toullad sizhunvezhioù hep keloù ebet ken eveljust eus ar Ruyet hag e diegezh.

Un deiz ez eo gweladennet gant unan eus e gamaladed kozh eus Sant Marzhin e Roazhon, an Tad Poulpiquet du Halgouet a zo bet soudardet hag en deus gwelet e anv war roll ar brizonidi.

- Petra 'maout oc'h ober aze ?

- A-enep d'ar gomunourion on...

- Klask chom hep bezañ kaset da Napoli. Amañ n'out ket maget mat (ne zebrier nemet irvin) met ne vez graet droug ebet dit. Du-se avat e vefe cheñchet penn d'ar vazh...."

E Napoli eo, e gwirionez, emañ kreizenn vras an Diogelroez Vilourel C'hall, ha di, eveljust, e vo dezoget a-benn ur pennad amzer.

Staliet eo burevioù an Diogelroez adarre en ur palez deoget, unan ouzhpenn ! Er vro-hont, eme Baol, ez eus palezioù e pep lec'h ; n'eus nemet palezioù ha lochennoù !

Eno ez eus berniet kantadoù a brizonidi, Gallaoued an darn-vuiañ anezho, hogen ivez un nebeut Brezhoned - kej-mesk, an eil war-c'horre egile, ken stardet ma ne c'hellont na gourvez na kousket er salioù divent e-lec'h int bet buorzet.

Degaset eo bet da gentañ dirak ur c'habiten hag

a zo, sañset, komiser-polis er vuhez disoudard. "A ! Un emrener breizhat! Emañ da ler o vont da zamantiñ!" Ha kentizh, ur mell taol-dorn er c'hilpenn a laka ar prizoniad da gouezhañ a-c'hwen e gof betek ar voger en tu all.

Neuze e krog e Paol daou skoazeller. E ziwiskañ a reont penn-da-benn ; eren a reont anezhañ razh, evel un tamm silzigenn ruz pe, kentoc'h, evel ur pennyer, pleget e zivesker, e seulioù a stok ouzh e feskennoù, ur vazh dindan an daoulin e-lec'h emañ staget ivez e zaouarn.

Ur vountadenn, ha trec'holiañ a ra ar prizoniad, o tiskouez e zivgell er vann ; teurel a reer warnañ ur sailhad dour ha kregiñ a reer gant an abadenn dre-dan.

Dic'houzañvus eo ar boan. Bourrañ a ra an daou vourev o plantañ an elektrodennoù en divgell, nemet an tachad kizidikañ ez eo marteze diazez ar fri. Adal ma vez tizhet al lec'h-se e vez distignet un dastaol, ha kregiñ a ra an den jahinet da harzhal evel ur c'hi

...

C'hoarzhin a ra an daou vourev a galon vat. "Selaou 'ta. 'Maño komz brezhoneg ! " Eveljust, Paol n'en deus gouezet morse anv an daou hailhon-se met lezanv unan anezho a zo 'Manthausen', dre maz asure e oa bet dalc'het er c'hamp brudet-se. Bezet pe vezet, war a hañval n'en deus ket gouzañvet kalz diwar e vac'hidigezh rak lart ha roz evel ur pemoc'h bihan ez eo.

An 'abadennoù' a bado eizh devezh. Goude pep unan anezho e vez stlapet, en noazh, war dar ar sal, ur roched hepken war e gein, staget e zaouarn hag e dreid - gleb holl, ma chom da grenañ e-doug an endervezh.

Un devezh ez eo dizoloet eno gant ar poliser-polis en doa skoet gantañ da gentañ. War a seblant en deus bet ar marmouz-se, evit ur wech, un tamm santimant denel. Kas a ra anezhañ en e vurev, e lakaat d'azezañ ha kinnig dezhañ ur sigaretenn. "Doue en devezet koun eus ar sigaretenn-se da zeiz ar Varn!"

Augustin Cattelliot en deus goulennet neuze ouzh

Paol :
- Paz oc'h bet boureviet, daoust ha komzet hoc'h eus ?

- "M eus ket graet ! O reizhiad-c'houleennata ne oa ket peuraezet da vat. Setu : ne felle ket dezho e vije klevet va yudadennoù pa vezent o voureviañ ac'hanon. Tud ar c'harter a c'hellje bezañ diskredet war un dra bennak hag en Italia, d'ar mare-se, e felle dezho tremen evit tud dereat : gwelloc'h e oa evito. Neuze 'ta, tra ma vezed ouzh va boureviañ, d'ar mare ma veze ar boan kriz a-walc'h evit ober din koll pep emreizh, e vezen minwasket; ha pa veze bet tennet va minwask evit va aters em beze bet amzer da gaout krog em reiz en-dro. Evel-se n'em eus lavaret netra."

A-c'houdevezh e voe dezouget ar brizonidi, dre lestr, betek Marsilho, e strad ar c'hal, eveljust. Jentil a-walc'h e oa an diwallerion evit magañ anezho gant busku soudarded ha kaotigell, nemet hep banne dour ebet. Tomm-broutac'h e oa avat er c'hal-se. E Marsilho e oa bet roet da c'houzout d'ar 'C'hengorioù-dieubiñ' e oa erruet 'faskourion', ken e voe bannet brikennoù warno pa zivourzhjont etre daou steudad lakepoded.

Bac'het e voe Paol e Karc'har ar 'Baumettes' ha goude-se e Fresne. Dalc'het e voe en toull e-pad daou vloaz hag e voe laosket davont e 1947, hep bezañ bet barnet da gastiz ebet nemet d'an "Dizenor Broadel" ha da gemedadur e vadoù.

Ne oa ket bet tu da zerc'hel danvez-tamall sirius ebet a-enep dezhañ !

16 C'hwevrer 1979

Emziviz dastumet gant Herve LANNDIERN

PROSEZ WAR VUHEZ HA BURZHODOU SANT ERWAN

Un den foll-diroll pareet

gant KLERG

Parrez Pleli(n) a oa gwechall eus eskopti Sant Maloù, ha bremañ emañ en hini Sant-Brieg. Brudet eo bet dreist-holl en abeg d'an abati bet savet war he he douar, Bellus Locus, deuet da vezañ Beaulieu. Stag e oa gwechall ouzh an abati-se evel prioldi, hag e teuas da vezañ parrez distag d'an 12 a viz Du 1803. Dedit eo an iliz-parrez da sant Pêr. Bez' ez eo eus kanton Plouvale, ha stag evit servij ar Postoù ouzh Trigavou. En hanternoz da Zinam ('Dinan')an hini emañ un teir lev bennak diouti.

E 1330 e oa eno un toulladig tud hag a zo deuet o anvioù betek ennomp betek ennomp a-drugarez da zielloù prosez Sant-Erwan. Diaes a-walc'h avat ez eo adskrivañ darn eus an anvioù-se. E diskleriadur an test CVI (106) ez eus ul lodenn a zo skrivet e galleg hag a adkaver e diskleriadur an test war-lerc'h dindan ar gwiskamant latin. Setu eta an anvioù evel m'o c'haver. Petrus PREVOST (latin : 'Prepositi'), Johannes LE SAUNIER (latin : 'Sonnerii', 'Saunerii'). Neuze Stephanus, Petrus, Guillemus CHAMETI (Chonneti, Chometi, gant Chauveti, Chouveti en ACTA SANCTORUM). Tri breur e oa ar re-mañ, ha Yann ar *Saoner a oa kenderv

dezho. Yac'h e oa an tri breur, met war-dro hanter miz Mezheven 1330 e teuas Gwilherm (Guillelmus) da sodiñ naet. Dav e oa bet hen stagañ gant liammoù kreñv, ha daoust da se o deveze poan pevar gwaz ouzh hen derc'hel.

Mamm Gwilherm eta ha Stefan a ouestlas anezhañ da veur a sant gant an esper e c'hellfe ar re-mañ degas ar pare dezhañ. Kas a rejont ar c'hlañvour, eme an destenn CVII, da veur a lec'h : da Sant Jagu, da Sant Leonor (=Luner) ha da sant Gwilherm, eus eskopti Sant Maloù. War a seblant ne oa ket un devoision ispisial da Sant Gwilherm en eskopti-se, ha ne weler na chapel, nag iliz gouestlet d'ar Sant eno. Setu e kav dimp e tleer lenn amañ SANT BRIAG. Sellit war ur gartenn hag e welot pegen tost ez eo Sant-Luner ha Sant-Briag ha gouest e oa hor 'perc'herined' d'ober o zro dre Sant-Yagu (1), Sant-Luner ha Sant-Briag en ur ober un devezh pe un devezh hanter, zoken gant un den chadennet. Koulskoude ne c'heller ket nac'h ez eo SANT GWILHERM an hini a zo skrivet en destenn orin, paz adkaver an hevelep meneg en ACTA SANCTORUM Skrid an eil testeni a zo gantañ muioc'h a vlaz latin, d'hor meno, eget an testeni kentañ, da lavarout eo, - seblantout a ra bezañ bet graet aketusoc'h. Dre benaos eta e vije bet lakaet aozer pe aozerion ar skrid da faziañ ? Sellit pet gwech e kaver an anv GUILLERMUS : nav gwech, mar ne faziomp ket. Meneget e oa SANT-BRIEG er skrid, ha setu neuze SANT-BRIAG ! Ne oa ket diaes d'ar sekretourion meskiñ ar stal ha bountañ SANT GWILHERM elec'h Sant-Briag, d'ober ar gont a zek, ken borrodet e oa o fenn gant an anv a 'c'hGUILLELMUS' !

Pa ne oa ket bet selaouet o fedenn gant Sant Yagu na gant sant Luner na gant sant Briag, setu ma ouestlijont ar c'hlañvour da Sant Erwan Landreger. Hag int war-raok. Ur merc'her e oa, ar merc'her goude gouel Pêr ha Paol. Pevar den o vont da ambroug an den sot, hag ivez mamm hemañ. Evel m'emañ ar c'hiz

ez eus bet prometet ur c'haer a brof da Sant Erwan : ur gantol-goar ken tev ha kof ur c'hlañvour, hag un all ken tev hag e gof.

Da c'hras Doue, goude bezañ graet ul lev bennak, e teuas gwellaenn e Gwilherm Chamet, hag e voe tu d'e zistagañ ha d'e lezel da vont hep derc'hel mat dezhañ. Ne reas ar wellaenn-se nemet kreskiñ muioc'h-ouzh-mui. Hag a-raok en em gaout e Sant-Brieg-an-Traoniennou, evel ma veze graet eus kêr Sant-Brieg d'ar c'houlz-se, e oa sampar an den sot. Derc'hel a reas ar gompagnunezh da vont war-raok evit seveniñ ar gouestloù o devoa graet mamm Gwilherm hag e vreudeur, Stefan ha Pêr.

Ur miz bennak da c'houde e tistroas Pêr ar Prevost Stefan Chameti, ha Gwilherm e-unan, da Landreger da zougen testeni, evit ar prosez kanonek.

Merkomp bremañ un evezhiadenn bennak diwar-benn anvioù an dud-se. Daoust m'hon eus diskouezet e oa skrivet an anvioù e meur a stumm, e kav dimp e tleer fiziout kentoc'h war an eil testeni (CVIIvet test) dre ma seblant bezañ bet aozet aketusoc'h eget an hini kentañ ha zoken e gwelloc'h latin. Bep tro e lenner CHAMETI evit anv ar c'hlañvour hag e vreudeur, tra ma kaver a bep seurt stummoù en testeni CVI:CHONNETI, CHOMETI, hep kontañ CHAUVETI, e levr an ACTA SANCTORUM (Bollandiz). An anv-se a hañval bezañ evit JAMET, anv bev bepred e Breizh, un anv da dostaat ouzh JAM, JALM=JAKEZ. Lezomp ar CHONNETI-CHOMETI a-gostez, pa ne welomp ket Petra lavarout. Stumm an ACTA SANCTORUM (CHAUVETI, diwar CALVUS=moal, moarvat) a gaver bepred 'kostez Dinan ('Dinan'). Setu holl ar pezh a c'hellomp da lavarout.

En testeni CVI e kaver LE SAUNIER e galleg, tra ma kaver an anv-se troet e latin SONNER(II) ha SAUNER (II) en destenn CVII. Un anv-micher ez eo, diwar SA-

LINARIUS=holenaer pe saogarnner. Aes-tre ez eo heuliañ emdroadur an anv-se : *SALNARIUS, *SAUNAER, *SAUNER ha neuze : SAUNIER. daoust maz eo diaes prouïñ netra gant seurt testenioù, e seblant an anv LE SAUNIER diskouez e oa gallek PLELI(N) d'ar mare-se. Iskis a-walc'h ez eo evelkent gwelout LE SAUNIER en testeni kentañ (hini Pêr Prevost) ha SONNER(II) ha SAUNER (II) en eil testeni. Anat eo diwar al latin-mañ e oa bet troet an anv : SAUNIER ; a-hend-all hor bije bet al latin reizh : SALINARIUS. Ur brouenn ouzhpenn, d'hor meno, e ranke bezañ galleg etre an dud-se.

Un tamm krogad ez eomp da gaout bremañ gant anv ar barrez ma oa an holl dud-seo chom enni:"PLESLIN". E levr de La Borderie e kaver PLELI, teir gwech ; neuze, PLEYLI, ur wech, ha PLOYLI, ur wech ivez. Rentañ-kont ar gardinaled (eil lodenn levr La Borderie) a ro ivez PLELI. E raskrid levr La Borderie e lavar ar mestr-diellour, D. Tempier, e tistag c'hoazh tud ar barrez, - e 1886, - PLELI, PLEYLI, evel en amzer Sant Erwan. Ne glever ket eta an -N-, pe gentoc'h, ne glevet ket an -N-se d'ar mare ma skrive D. Temier, rak hervez person ar barrez e tistager bremañ PLELEÑ" (1979). Ar stumm PLESLIN a glot koulskoude gant ar pezh a gaver e Pouilhad Teurgn (2) war-dro 1350. An -S- er skritur a zo, moarvat, un aspadenn eus an -S- eus plebs, met ne veze ket distaget. Gwelout a raimp a-hend-all e fin ar pennad-mañ petra da soñjal eus an -N- e dibenn an anv.

Neuze e chom ganeomp PLELI, PLOYLI, PLEYLI. Lenn a reomp PLEBS-ELI deuet da vezañ PLOYLI ha PLELI.

Piv eo eta an ELI/ILI-se, diazezour ar barrez ? An anv ELI a gaver er varzhoniezh kozh kembraek evit DOUE. Un anv biblek ez eo. Met kavout a reer ivez ELI evel anv-den. Setu amañ, da skouer, ar pezh a

lennomp e CANU ANEIRIN (pennadig 92) :

- 1140 Gouez en argad, dalc'hus er waskadeg.
Er stourmad ger ebet gantañ a druetz.
E deiz ar c'hrogad n'eo ket en a nac'hje
(emgannañ).
- 1143 Ur bleiz konnaret e oa Bleizig mab ELI.
Gwin en devoa evet eus hanafoù lugernus.
E deiz ar foeterezh e reas kurioù :
Diwar e varc'h gwenn, kent mervel,
Kelanoù ruz-gwad a lezas war e lerc'h.

Nepell eus Kêrdiz, e Kembre, e kaver TRELAI hag a seblant bezañ evit TRELI pe TRELY (met, siwazh, n'en deus an ELI-mañ netra da welout aze ! Anv ur stêr ez eo : ELAI ; an hevelep anv hag an ELLE e Breizh; kv. KEMPERLE = "Kemper-an-Elle").

Bez' ez eus tu evelkent da glask un diskleriadur en anv LLANELLI a gaver e Kembre : *LAN(N)-ELI. An daou LL e-kreiz an anv n'int ket, a gav deomp, ur skoilh evit an diskleriadur emeomp o vont da ginnig, rak an daou LL-se a zo L hepken e brezhoneg evel, da skouer, ILTUD a zo, e kembraeg, ELLTUD (ILLTUD).

An ELI/ILI-se a gaver e 'Buhez Sant Kadog'. Sed amañ, berr-ha-berr, penaos ez eo kontet istor an ELI-se.(3)

Skrivet e oa bet 'Buhez Sant Kadog' e latin en un-nekvet kantved. E-kerz unan eus e veajoù niverus e tichañsas da sant Kadog en em gaout en un enezeg ben-nak hag a veze graet KRIMBUL (4) anezhi. Eno e oa ur rouanez hag a veze graet buhez fall dezhi gant he fried dre ma ne oa ket evit kaout bugale. Pa glevas edo Sant Kadog o paouez erruout war zouar he rouantelezh, ez eas kercent d'e gaout d'hen pedif da sevel diwarni ar vezh a oa eviti bezañ difrouezh. Ar sant he bennigas hag a bedas eviti, ha selaouet e voe e bedenn. Derc'hel a reas Kadog gant e veaj hag ez eas etrezek Gresia hag an Douar Santel. Pa zistroas tri

bloaz goude e tremenas adarre dre an hevelep hent hag e voe roet dezhañ da sevel mab ar rouanez a yeas gantañ da Nantkarvan (5). ELLI a veze graet eus ar bugel. Diwezhatoc'h, paz eas Kadog kuit eus Nantkarvan evit dont da vezañ Tad-Abad Benevent en Italia, ez eo ELLI eo a voe lakaet da dad-Abad en e lec'h.

Skrivañ a reer ELLI en ur stumm ispisial e latin: ELLINUS (tro-c'henel ; ELLINI). Iskis a-walc'h eo ar c'hendegouezh, pa soñjer e parrez PLELI(N). Rak tu a zo evel-se da ziskleriañ doareoù-skrivañ disheñvel anv ar barrez-mañ e prosez Sant-Erwan hag e Pouilhad Teurgn. E latin e c'helled kaout : PLEBS ELLI ha PLEBS ELLINI, o reiñ PLOUELI-PLELI, ha neuze: PLOUELI-PLELIN.

Lavaromp ez eus e Kembre di' Llanelli ; unan e kontelezh Kervarzhin, hag eben e kontelezh Vrec'heiniog. Tu a zo, d'hor meno bepred, da welout en ELLI-se, diskibl Sant Kadog, ar sant en deus bet roet e anv da barrez PLELI(N).

D'an 23 a viz Genver e vez lidet e ouel (6).

KLERG

+++++

NOTENNOU

- (1) JAGU, en destenn. Diwar 'Jacobus' e teu an anv-se. Ar stumm JACUTUS a gaver a-wechoù met ne seblant ket bezañ gwirion.
- (2) POUILHAD. Diwar al latin PULATUM, anezhañ un distummadur eus ar gresianeg latinekaet : POLYTYCHUM=marihoù, dielloù. Heuliet skouer ar galleg "Pouillé" evit brezhonekaat ar ger-se.
- (3) VITAE SANCTORUM BRITANNIAE & GENEALOGIQUE, by A.W. Wade-Evans, 1944.
- (4) An anv iskis-se ne oar den petra eo. Un nav skrivet fall ? UN nav ijinet ?
- (5) NANTKARVAN a skrivomp ha n'eo ket LANKARVAN. Latin: Carbani Vallis.
- (6) Bez' ez eus c'hoazh ur sant hag en deus un anv heñvel ouzh hini ELI/ELLI : Sant Eilian ('Eili vihan') e Kembre, e kontelezh Dinbec'h ('Dinbych'). Ne reomp nemet her menegiñ.

EEEEEEEEEEEE

A-DREUZ LENN

Yann FOUERE.- Ces droits que les autres ont.
300p.

E fin na hañv ez eus bet embannet ul levr diwar bluenn Henri Fréville : La Presse bretonne dans la tourmente : 1940-1944. Lavarout groñs a ra ar raskrid - savet gant ar skrivagner e-unan - ez eus aze un oberenn neptu, a zispleg an traoù evel ma oant. Evurusamant ez eo gant Fréville e-unan ez eo bet skrivet ar gerioù-mañ. Rak, war-lerc'h meur a bajennad (pell a-walc'h diouzh an destenn) a-zivout stad ar politikerezh en Europa etre an daou vrezel, ez eo tizhet abenn ar fin ar pezh a zo danvez pennañ al levr ; ha neuze, da grediñ eo ez eo bet savet al levr dreist-holl, koulz lavarout, evit tagañ labour Yann Fouéré a-hed ar pevar bloavezh ma voe dalc'het Breizh gant an Alamaned. Diazezañ a reas Y. Fouere ar gazetenn LA BRETAGNE hag e voe rener politikel LA DEPECHE DE BREST e 1942.

Galvet da vezañ barnet en amzer griz an 'Dieubidigezh', e kavas furoc'h goulenñ goudor digant Iwerzhon. War-dro ar bloavezh 1954 avat en em ziskouezas dirak al Lez-Varn-Arme, ha lamet diwarnañ a-grenn an tamall da 'vezañ kenlabouret gant an enebour'. N'eus forzh : hep ehan e klask H. Fréville prouiñ e c'hoarias Yann Fouere a-du gant an Alamaned. Nerzh gwirioniel an 'dra varnet', se 'zo disterañ preder ur paotr a ziskleir ez eus anezhañ un istorour peurleal ! Fentus eo a-hend-all gwelout o vont da varnour an hini a voe karget e 1944 da skrapañ madoù an embregerezhioù-moulañ, kazetennoù h.a. "Gwirioù al laeron!" Unan en em c'houlennfe a-walc'h hag-eñ ez eo dre zegouezh e

teu er-maez al levr-mañ d'ar mare resis maz eo tamallet Y. Fouere dirak Lez-Varn Diogelroez ar Stad, en afer ar F.L.B. Se n'eo ket bras ! Neuze, penaos degemer evel 'komzoù-an-Aviel' ar pezh a zo dibunet? Penaos bezañ asur e vezo degaset pep diell, ha n'eo ket hepken ar re a zo a-du gant tezenn ar skrivagner ?

Trawalc'h avat gant levr an aotrou-mañ !

Poent eo komz a-benn ar fin diwar-benn ur studi hir en niverenn 6 ha 7 eus LES CAHIERS DE L'AVENIR DE LA BRETAGNE : "Ar gwirioù-se hag a ra ar pobloù all ganto..." Sklaer eo an talbenn: Y. Fouere a gen-dalc'h gant an emgann breizhek war dachenn ar gwir. Evelato n'eus ket amañ un aridennad a bennaennoù-lezenn, displeget en un doare sec'h ha poanuis da lonkañ. Dibabet en deus ar skrivagner doare an emzviz gant ur paotr bennak eus broioù gouarnet diouzh ar reizhiad kevreadel : USA, Suis, Italia, Yougoslavia ; dibabet eo ar stadoù-se evit kaout tro da ziskouez ez eo lakaet ar gevreadelezh da dalvezout ken e broioù bras ken e broioù bihan, ken er broioù marksat ken er re n'int ket.

Eveljust, krin a-walc'h eo an danvez, kreñv avat an dezenn, ha mailh war ar vicher eo ar skrivagner. N'en deus ket savet ul levr da vezañ lennet evel ma vez lennet ur romant, - ul levr-studi, ne lavaran ket, ul levr prizius evit ar stourmer breizhat. Sur eo hemañ da gavout ennañ an arguzennoù gwellañ a-enep da bismigerion ar 'self-government' pe an 'emrenerezh' evit Breizh, pe ar reizhiad kevreadel dre vras. Netra nevez: atav an hevelep randonerezh abaoe kant vloaz! Aesaet e vo ar respont d'ar bismigerion gant ar skouerioù tennet eus Stadoù a bep seurt dre ar bed.

Un oberenn a dalvoudegezh en deus savet Y. Fouere. Perak ez afe da respont, o koll e amzer, d'an tagadennoù tagnous ha binimus ? Emdroet eo ar bed abaoe 35 bloaz ; n'eo ket chalet an dud a hiziv gant an tra-

où kozh-se. Gwell eo da Yann Fouere labourat evit an amzer-da-zont. Kalon vat dezhañ.

GUIVARCH (François).- Les Johnnies de Roscoff.- Nature et Bretagne, 1979.- In-8°, 200p
Priz : 35 lur.

A-hed va bugaleaj em bez klevet komz alies eus Jonniged, evel ma vez lavaret er vro diwar-benn ar Roskoiz-se. Setu aze ur vicher (hini ur marc'hdaour-red) a zo anavezet mat hag a vez graet ganti hepken e korn-bro Rosko ha tro-war-dro. Un tamm brud a zo deut dezhi da heul romant Y.M. Rudel, embannet e 1946 : "Johnny de Roscoff". Prim e vez ankounac'haet ar romantoù. Setu perak ivez e vo deuet mat levr F. Guivarch ; ur studi, emezon, ha n'eo ket, ur romant, met un danevell o tibunañ ar perag hag ar penaoz eus ar c'hiz-se : istor, buhez, stad an traoù hiziv h.a. Ur Roskoed eo F. Guivarch, ur paotr anavezet mat gantañ buhez ar gouerion o lakaat dindan ognon un douar strujus. Er vro-se eo bihan an atantoù ha niverus an dud. Evit bevañ e voe ret d'ar gouerion mont da labourat er-maez eus ar vro e-pad ul lodenn eus ar bloavezh.

E 1828 eta e fellas da Henri Olivier, ugent vloaz dzhañ, mont da Vro-Saoz evit gwerrzhañ e-unan ognon e zouar. Mat e voe an traoù gantañ, ha meur a gouer a dreizhas ar mor war e lerc'h evit mont da Vro-Saoz d'ober eveltañ. Buan e voe dav dezho en em vodañ e kevrennoù, ken evit feurmiñ ur vag hag ul lec'h-dastum ken evit aozañ labour ar werzherion. Evel-se e voe savet "ar strolladoù", o vodañ eizh, dek, pemp-warn-ugent a dud, alies kerent-nes. E deroù ar c'hantved-

mañ, daoust maz eo diaes gouzout an niver resis, ez eus da grediñ e save an niver-se betek ne tu-hont da 1.500.

Chom a raent e Bro-Saoz, pe gentoc'h, e 'Breizh-Veur' adal miz Eost betek fin ar bloavezh, ha pelloc'h ; mont a raent war-dro kêrioù an aod penn-da-benn, e Bro-Saoz, Bro-Gembre, Bro-Skos : Glasgow, Dinedin, Abertawe, Manceinion ('Birmingham'), New-castle ha, zoken, Lunden. Bep bloaz e tistroent d'ar memes lec'h hag evel-se e vezent anavezet mat gant ar brenerion. Eveljust, - ma veze aes ar werzh a-wechoù, e veze diaesoc'h a-wechoù all, ha tro pe dro ivez e veze kollet ar varc'hadourezh, pa veze bet re hir an dreizhadenn pe re fall ar mor. C'hoarvezet eo ivez gant meur a hini mont da anaon en ur beñseadenn bennak. N'eo ket ankounac'haet e Rosko ar peñse skrijusañ : hini an "Hilda", en noz eus an 18 a viz Du 1905, dirak Sant-Maloù : beuzet e voe pe seizet gant ar riv war-dro daou Jonig ha pevar-ugent ; ur gwall-reuz evit Roskoiz.

Harzet e voe ar werzh-se e-pad ar brezel 1939-1945. Met, tra souezhus, start e voe adkregiñ ganti war-lerc'h 1945, evit un afer a baperioù. Serret e oa dorioù Breizh-Veur ouzh ar marc'hadourezhioù estren ha na veze ket bet roet dezho un aotre-enporzhiañ. Ne felle d'ar velestradurezh reiñ an aotre-se nemet d'ur gevredigezh hepken. Ret e voe eta krouiñ ur gevredigezh evit ar Joniged, daoust ma ne blije ket an dra-se tamm ebet dezho. Ouzhpenn-se, ret e oa kas d'ar vro an holl arc'hant dastumet dre hanterouriezh nemeti ar gevredigezh-se.

Hizivan deiz ez eo aesoc'h an traoù met ne chom nemet un daou-ugent bennak a Joniged. Marteze ez eo kavet rust ar vicher gant ar re yaouank daoust ma n'eo ket ken garv ha gwechall, pell emañ.

Re a draoù avat a vefe da gontañ. Gwell eo lenn Levr F. Guivarch, ul levr dedennus-tre, savet diwar an dielloù-skrid ar gwellañ, savet ivez diwar an

divizoù bet dalc'het gant tud kozh ar vicher, ul levr ivez skrivet gant ar galon. Chañs vat d'ar skrivagner!

J.C.

~~~~~

#### DIWAR BENNAOUIÑ

Setu komzoù ar Pab Yann-Baol II en Iwerzhon : "Kement den 'zo a zle bezañ doujet ; kement keduniezh-tud - pe war ar ouenn pe war an istor pe ar sevenadur pe war ar grevez e ve diazezet - a zle bezañ douget bri dezhi. En arvar e vez ar peoc'h bep tro ma vez gwallet unan eus ar gwirioù-mañ, pe gant un den pe gant ur strollad pe gant ur Stad ha n'o deus digarez ebet d'henn ober, ha pa ve zoken evit surentez al lezenn pe urzh-vat ar gevredigezh. Lezenn an Aotroù Doue a zo a-us da vad ar Stad.

Keit ha ma vo direizhderioù war un dachenn bennak, politikel, kevredigezhel, armerzhel, sevenadurel, krevezel, ne vezo ket a beoc'h gwirion. Ret eo klask abegoù an direizhderioù hag o argas e seurt dorae ma c'hello pep den en em ziorren ha tizhout e vent dezhañ e-unan..."

\*\*\*\*\*

Gouzout a reer e oa techet kalz eskibion e Bro-C'hall da skarzhañ ar sakramantoù ha, peurgent, hini ar Binijenn e ser an 'absolvegoù', da skouer. Pa oa miret diavaez ar sakramant-se e veze lamet e ster relijiel dioutañ oc'h ober anezhañ arouezenn an "adenglev" ('réconciliation', e galleg)... gant an dud, rak an dizenglev gant an dud pe etre an dud a oa deuet da vezañ ar pennañ pennpec'hed, an hini nemetañ, hag ar garantez evit an nesañ ar gourc'hemenn kentañ (ha roet e veze gant lod, e-giz ma ouzer, un arster politikel dezhañ).

Hervez doare e sav an avel d'an uhel evel gwechall hag e-barzh ar gazetenn 'Ouest-France' eus ar 6 a viz Du e taweler diougan ur c'hem : krog eur da reiñ tro d'ar rod-stur. Dont a reer en-dro d'un anvad a zo kar-nes d'an anvad kozh : Sakramant an Distro da Zoue. Kaer eo gouzout ez eo da heul gourc'hemenoù groñs ar Pab Yann-Baol II o komz en e brezegenn ouzh ar Gardinaled diwar-benn al lec'h bras a zle Sakramant an Distro da Zoue kaout e buhez ar c'hristen ez eo c'hoarvezet ar c'hem-se.

AN ARVESTER

GERIOU DIVOUTIN

A.  
ADREIZHADUR/réforme  
AMVEVAD/environnement  
ANVELIELOUR/anarchiste  
(d'esprit)  
ANVELIOUR/anarchiste  
(pratique)  
ARAOGELOUR/progressiste  
ASKORIN(WAR)/DONNER NAIS-  
SANCE A  
B.  
BEVEZIN/consommer  
BREDELFENNAN/psychanaliser  
BREDELFENNOUR/psychanaliste  
BREDKLANVOUR/malade mental  
K.  
KALVEZEL/technique  
KALVEZONIEL/technologique  
KANTTREIN/convertir  
KEALIADUREZH/idéologie  
KEDUNIEZH/communauté  
KEFREDEL/intellectuel  
KEFRIDIEL/officiel  
KEHUZAN/accuser  
KEMBLAC'H/correspondant  
KEMPOELL/logique  
KEMPLEGEREZH/conformisme  
KENARROUD/contexte  
KEVALAOUR/capitaliste  
KEVATALOURIEZH/égalitarisme  
KEVREDEL/social  
KEVREDIGEZHEL/social  
D.  
DAELEREZH/dialectique  
DAMVENNOUT/avoir la velléité de..

DANVEZ-KEHUZAN/chef d' d'  
d'accusation  
DELANVAD/influence  
DERC'HOUEZAN/représenter  
DEZVEG/code  
DEZVEG DINAZEL/code ci-  
vil  
DIARC'HADUR/revendi-  
cation  
DIATORADUS/irrécupérable  
DIELFENNAN/analyser  
DIOGEL/assuré  
DIORREADUR/développement  
DIUNGENEZHDED/caractère  
hétérogène  
DIZERIADUR/dépérissement  
E.  
EC'HWEL/grève  
EZTAOLIN/exprimer  
FRAMMADUREZH/structure  
GOUEZONIEL/scientifique  
GOUVLENIAN/inspirer, di-  
riger par en dessous  
GREDEK/zélé  
GWALLVESKAN/compromettre  
GWERED/effet, action  
GWIRIEKAAT/vérifier  
HELAZHEREZH/euthanasie  
HEMOLC'HIDIGEZH AR SOR-  
SEREZED/chasse aux  
sorcières  
HEROUEZAN/favoriser  
HEULAVOURIEZH/eschatolo-  
logisme

BURUTELLEREZH

E SIGUR PENNAD JORJ GWEGEN

"Bro-Normandi : ur yezh dezhi ivez"  
(bet embannet war AL LIAMM, Nnn 195, Gouere-Eost 1979)

-----

En ur ober dave da oberenn veur Meic Stephens :  
"linguistic minorities in Western Europe" embannet  
gant Gomer Press, e pouez Jorj Gwegen war dalvoudegezh  
rannyezhoù zo a yezh Oïl ha, peurgent, an normaneg,  
sellet betek-henn evel un trefodaj dister hepken e-  
keñver yezhoniezh ha sevenadurezh. Ar pennad-se, ker-  
koulz hag ar gartenn, a ziskouez deomp bevennoù an  
'normaneg' (notomp ne gaver war ar gartenn-se nemet  
lodenn an hanternoz eus Normandi hag an aod ivez) a  
lakaio kalz a dud da anavezout traoù a oa dianav-  
krenn dezho betek hiziv.

Hag eñ diforc'h diouzh ar gallaoueg er c'heñver-  
se ez eo bet ar parland normanek ur yezh skrivet, bet  
dezhi un azginivelezh, dreist-holl er XVIvet hag er  
XVIIvet kantved. Er rannyezh-se e kaver ul lennegezh  
ha n'eo ket dibouez a-grenn. Bez' ez eus ivez un  
toulad geriadurioù pe c'heriaouegoù eus ar parland  
normanek, an hini gwellañ o vezañ ar geriadur Jerzeg-  
gallig diwar bluenn Franck Le Maistre, a zo ul labour  
heverk a yezhoniezh.

Evel holl skridoù Jorj Gwegen e ro ar pennad-se  
peadra da soñjal, ha neb henn lenno a denno kentel ha  
plijadur dioutañ.



Ne gredan ket evidon-me koulskoude e ve un da-zont bennak evit rannyezhoù Oïl, ne vern pere ez int hag an abeg pennañ am eus da soñjal an dra-se eo emaint e pep lec'h war o zremenvan, breinet en o diabarzh gant galleg Pariz, nemet, marteze, e Wallonia, ha c'hoazh !

Ma lakaer a-gostez an dalvoudegezh o deus e-keñver yezhoniezh (hag a zo diarvar) ne gav ket din a-hend-all he defe unan bennak eus ar rannyezhoù-se un dalvoudegezh vras all drezi hec'h-unan; hini ebet n'he deus pourchaset danvez ur sevenadur gwirion ha diseurt ; hini ebet n'he deus krouet oberennoù lennegel pouezus a-walc'h evit ober anezhi ur wir yezh. Sed pezh ez eo bet ar 'skoseg', ar 'scots' ; hogen dres ivez, n'emañ ket an normaneg - ha nebutoc'h c'hoazh ar gallaoueg, er par-se (d'hor soñj, ez eo aet re bell un tamm mat ar re o deus klasket lakaat war gont ar gallaoueg oberennoù evel 'La chanson d'Acquin' pe 'Le Livre des Manières' gant Etienne de Fougères, a zo bet savet, e devoud, en ur galleg kozh ha n'eo ket gwall zisheñvel diouzh yezh Pariz er mare-se.

Kement-se a zo gwir zoken en ur stumm bennak evit ur yezh wirion ha Jorj Gwegen en deus komprenet mat-tre an dra-se pa lavar evit echuiñ "ez eus talvoudegezh ha pouez er brezhoneg dre ma tiskouez ar vroadelezh vrezhon hag, ivez, dre maz eo-eñ test diwezhañ war gevandir Europa eus unan eus he brasañ sevenadurioù..." Ha rak-se ivez e sellomp-ni Breizhuheliz outañ evel hor yezh-ni.

A-hend-all ne c'heller ket nac'hañ e weler er bed a-bezh ar rannyezhoù o steuziañ buan ; n'int nemet aspadennoù ur saviad kozh eus hor c'hevredigezhioù, ur saviad a zo aet e-biou, pe e keuzier dezhañ pe ne ne reer ket !

Eveljust e c'hellfed hetiñ e vefe miret ar pep gwellañ eus an holl rannyezhoù, evit ma teufe ar yezh lennek da gerc'hat enno - evel en ur vammenn - an

teñzorioù bet berniet enno a-hed ar c'hantvedoù, ha dont da vezañ pinvidikoc'h dre an hent-se (sed aze dres talvoudegezh ar gwenedeg evit ar brezhoneg) met en degouezh-se end-eün e stokomp ouzh ar fazi diazez a reer bewech ma klasker gwiskañ pep rannyezh en un doare artifikel gant ur reizhskrivadur diforc'h diouzh hini ar yezh lennek; kement-se a zigenvrez anezho da vat hag a vir outo a vezañ skignet e pep lec'h.

Dre m'en deus ar gwenedeg ur reizhskrivadur pell-tre diouzh hini ar brezhoneg peurunvan, - ur reizhskrivadur a zo kaer hag heneuz a-hend-all - ez eo diaes-bras d'an darn-vuiañ eus ar vrezhonegerion tizhout an danvez a zo kuzhet dindan ar gwiskamant dibar a zo bet roet dezhañ, ken e chom ar Vrezhoneg hiziv dic'houzvez a-grenn eus ul lodenn vras-tre eus hol lennegezh.

Ma vefe embannet pennoberennoù ar skrivagnerion wenedek er yezh peurunvan, gant ar skrid gwenedek en un tu hag an doare peurunvan en tu all, keñver-keñver, (se a vefe ret dreist-holl evit ar varzhoniezh d'hor soñj) e teufe d'ar gwenedeg ur vuhez nevez ha moarvat en defe dre se ul levezon don war hol lennegezh dre vras, diouzh un tu, ha, diouzh un tu all, war emdroadur ar yezh, ken e-keñver geriadur, ken e-keñver ereadur. Evit ar poent avat ez eo e skritur kaer hag heson ul liñsel a varv evitañ.

Ouzhpenn-se, en ur bed e-lec'h emañ pep sevenadur diforc'h, pep yezh bihan pe etre war var da vezañ lonket gant erevent an unrezekadur hag ar goulloadur, e tleomp strivañ ha stourm evit mirout ar pep pennañ eus hor peadra, hep skignañ hon nerzh e pep lec'h.

Da hetiñ e vefe, da skouer, e vefe savet gant ar brezhoneg hag ar c'hembraeg, ha marteze ivez, gant an iwerzhoneg (evel maz eo bet graet evit ar yezhoù skandinavek) ur bank a c'herioù boutin e-lec'h e c'hellfe hor yezhoù kemer ar pezh o defe ezhomm ; se a c'hell ober an daneg, lakaomp. Hemañ en deus er-

lec'hiet ouzh un toullad gerioù alamanek a strobe anezhañ, gerioù ha termenoù implijet gant ar pobloù skandinavek all, ma reer ar c'henstroll anezho NORRE (an NORZ, ar bed skandinavek) (1). Gant gerioù all, pep tra ranker ober evit ma heuilhfe ar brezhoneg hag ar yezhoù keltiek all hentoù kenstur en o dior-readur, oc'h en em skoaziañ an eil egile.

Distroomp avat d'an 'normaneg'. Doare diseurt ar bobl norman ez eo da gentañ e orin skandinavek, evit darn, da vihanañ, ha war an tu-se e tlefe treiñ, ma fell dezhi adkavout he gwriziennoù donañ.

Ur perzh dibar all a zo dezhi eo hec'h istor meur diforc'h diouzh hini Bro-c'hall e-pad ur c'hantved hanter bennak. Da heul an "aloubidigezh" e teuio he yezh, disheñvel diouzh rannyezh Pariz, da vezañ e-pad tri c'hantved hini Bro-Saoz, a-raok bezañ teuzet er saksoneg hag engehentañ tamm ha tamm ar saozneg ar-nevez, a zo ur yezh normanek pe 'gall normanek' evit an hanter.

Ma lakaer a-ziforc'h parlandoù Jerzenez ha Gwernenez a zo o vont dillo da get ez eo er yezh saoznek a vremañ, yezh kemmesk, daou orin dezhi, e kaver ar muiañ a roudoù eus an hêrezh norman, - kalz muioc'h eget er 'parland normanek-se en hanternoz da linenn Joret (a ziskouez ar vevenn anezhañ) hag a zo beuzet hiziv dindan galleg Pariz.

Ne c'hello Bro-Normandi adkavout he fersonelezh nemet o tistreiñ d'an hengoun skandinaviat hag o tizezañ darempredoù strizh gant Bro-saoz, he zrevadenn a wechall, m'he deus enlouc'het enni ur merk na distrujoñ biken, en he yezh koulz hag en hec'h ensavadurioù : eno emañ lezet ar pep gwellañ eus hec'h hêrezh a vro.

15 Gwengolo 1979

Herve LANNDIERN

(1) Suomi a zo da stagañ ivez ouzh an Norre e-keñver sevenadur, nemet e-keñver yezh ez eo da stagañ ouzh ur bed distag a-grenn.

## KENSKRIVEREZH

A-berzh Jil Ewan e sigur un Akademiezh vrezhonek

-----  
Gwengamp, 3 Gwengolo 1979

"Distreiñ a ran bremañ d'al 'labour-Akademiezh' e komzen dit diwar e benn e deroù va lizher. Moarvat ne vije ket ken distabil ar c'heriadurezh ar-nevez (fonnusaat ma ra dre ret gant emdro ar yezh) mar bijen-me bet selaouet ha skoazellet ur mare a voe.

Setu tremen ugent vloaz e krogis da genskrivañ gant tud a bep seurt diwar-benn ar gudenn o tennañ da sevel un Akademiezh dre skrid.

Savet en doa Roparz Hemon ur pennad war ABK e 1957 ha kaset ul lizher din un nebeut bloavezhioù da c'houde evit diskleriañ e oa kenveno ganin.

Da c'houde e teuas SADED. Krediñ a raen e vije bet lakaet un dra bennak war droad. Sevel a ris d'ar mare-se ur bern pennadoù ha betek reoliadurioù evit klask reiñ korf d'un Ensavadur gouest da zirouestlañ ar c'hudennoù geriadurel a rakwelen endeo, maz omp beuzet hiziv dindan o fouez. Ha skleur ebet bepred ouzh an dremmwel...

Setu perak e lavaran ur wech ouzhpenn e tleer asantiñ bremañ skrivañ IVEZ ur brezhoneg da vezañ studiet, naren da vezañ lennet - elese, 'lonket' a-raok pep tra, fazi graet betek re gant yezhkarourion o hevelebekaad stad hon yezh ouzh hini ar yezhoù riezel amezek. Rak da betra e talvezfe mont da sevel ur yezh graet evit lenn a-raok pep tra ur bern traoù a c'hallomp anavezout war-eeun dre araez ar yezhoù riezal amezek, ma ne vez ket ar brezhoneg ar-nevez emaoamp hiziv o sevel o tegas dimp un dra bennak ouzhpenn, ma ne vroud ket ennoomp ar c'hoant da zeskiñ, dres a-raok pep tra, traoù na gavomp ket war-eeun e park ar yezhoù riezal amezek. Hag ar pep priziusañ e seurt keñver eo hep mar ar gelennadurezh a vez o teverañ evel ent gouezoniell diwar frammadurezh an nevezc'herioù, bennozh d'ar sturyezhouriezh. Kefridi veur ar brezhoneg uhel



hiziv zo neuze klask da gentañ menegiñ gwirionezioù chomet hep be-  
zañ diskleriet gant ar yezhoù riezal amezek. Sevel hevelep benveg  
meizel avat a c'houlenn diganimp, ar skrivagnerion, ur varregezh  
ouezoniell, na strivomp ket holl marteze da vestroniañ a-walc'h war  
dachenn ar c'heriadouriezh.

Jil EWAN

ADDISPLEG.

A-du omp dre vras gant hor c'henskriver hogen ret eo an zav ez eo  
distank-tre c'hoazh ar brederourion a ve gwir vrezhonegourion war  
un dro. A-hend-all, ar ger 'gwirionezioù' a vefe da dermeniñ; komz  
a c'heller eus 'gwirionezioù ar Feiz' ; hogen daoust ha gellout  
a reer komz eus 'gwirionezioù ar brederouriezh' ? Peseurt prederou-  
riezh adarre. A-hend-all he deus ar yezh ivez ur roll a gendarem-  
pred etre an dud en ur sevenadur bennak ; gerioù a rankomp arverañ  
evit talvezout kealioù zo a zo degemeret gant ur sevenadur zo, hep  
ma vijemp a-du gant ar sevenadur na gant ar c'healioù; er c'hontrol  
ne glaskimp a-wechoù nemet stourm outo hag o dizarbenn.

Y.O.

GERIOU DIVOUTIN (Kendalc'h)

|                                        |                                                     |
|----------------------------------------|-----------------------------------------------------|
| HILASTALEREZH/contrôle des naissances  | REOLIEKAAT/réguler, régu-<br>riser                  |
| LIESELOUR/pluraliste                   | REOLIN/contrôler                                    |
| MEIZEL/intellectuel                    | REVEL/sexuel                                        |
| MEIZOUR/penseur                        | REVELOUR/sexualiste                                 |
| ORINELEZH/originalité                  | REZ-BEVAN/niveau de vie                             |
| PELLVLENIAN/téléguider                 | RIEZEL/étatique, d'état                             |
| REIZHKRED/orthodoxe                    | SEVENADUR-BEVEZIN/civilisa-<br>tion de consommation |
| SKRIDAOZAN/rédiger                     |                                                     |
| SIOC'HANEREZH/avortement               |                                                     |
| TUN-/pseudo-                           |                                                     |
| TRABEDEL/métaphysique                  |                                                     |
| STURYEZHOURIEZH/linguistique normative |                                                     |

DISKLERIADUR A-BERZH "KRISTENION BREIZH"

E SIGUR KRAF AR SIOC'HANEREZH

Hanter-kant milion a grouadurion a vez lazhet e kof o mammoù  
bep bloaz, hervez A.B.R. ('Aozadur ar Broadoù Unanet'). Klevet  
e vez merc'hed o huchal "Din-me eo va c'horf ! " Lakomp, daoust  
ma n'eo ket anat ez eus gant mab-den ar gwir d'ober gant e gorf  
ar pezh a gar, e zistrujañ, da skouer. Met n'eus forzh penaos,  
ar c'hrouadur a zo e kof ar vaouez n'eo ket korf ar vaouez ez eo;  
ur c'horf a-ziforc'h ez eo, dezhañ perzhioù hêroniel diforc'h be-  
pred diouzh re gorf e vamm. E galon zoken, peogwir en deus unan,  
ne dalm ket a-unan gant kalon ar vamm ; empennañ a c'heller e  
c'hellfe zoken ar groueell en em ziorren er-maez eus korf ar vamm.  
Korf ar vamm a ro bod d'an danvez krouadur ; n'eo ket perc'henn  
warnañ evit keloù se.

Kement-se a zo anavezet zoken gant lezennoù Bro-C'hall. Lemn  
a reer, da skouer, er mellad 906 eus an dezveg dinazel ez "eo a-  
walc'h bezañ engehentet evit bezañ sellet evel danvez hêr..." Er  
mare-mañ enta ez eus dislavar etre lezennoù bro-C'hall, unan o  
tiskleriañ e roer ar gwir d'ur groueell da vezañ perc'henn war  
vadoù, oc'h ober anezhi un hiniden enta, hag ul lezenn all, mouezh-  
iet e 1975 o lemel pep gwir digantañ, hini ar vuhez zoken ! Ha  
padal e lenner e Diskleriadur Hollvedel Gwirioù Mab-den : "Kement  
den 'zo en deus ar gwir da veañ..." Hag e "Diskleriadur Gwirioù  
ar Vugale..." : "Ur gwarez dibar a zo dleet da bep bugel, ur gwa-  
rez hervez lezenn, kent ha goude bout ganet..." El lezenn Veil  
zoken eo skrivet "Pep den a rank bout doujet dezhañ kerkent ha  
deroù e vuhez : al lezenn eo."

Sokialourion al "Life Labour Group" e Breizh-Veur a embann :  
"Ni, sokialourion, a zo a-du evit difenn ar re wanañ, ar re ar  
muañ dizifenn. Piv avat a zo ar gwanañ, ar muiañ dizifenn; mar  
n'eo ket ar c'hrouadur nann-ganet ? Bevañ a zo dleet dezhañ!"

Gwiriañ a rankomp a-hend-all ne vije bet mouezhiet biskoazh  
al lezenn Veil en ur Vreizh dieub, zoken ac'hubet ha dindan levezon  
ar c'hallaoued ; ar goumourion hepken ha lod eus ar sokialourion



